

**VA
C'HATEKIZ KRENN**



TOLRA • EMBANNER • PARIS



Jezuz eo mignon ar vugale.
« Lezit ar vugaligou da zont d'am c'haout ».

(1^a) KENTEL GENTA

1. Petra eo ar c'hatekiz ?

Ar c'hatekiz eo al levrig a zo ennañ, e berr gomzou, dre c'houlenn ha respont, al lezenn gristen penn-da-benn.

2. Ha c'houi a zo kristen ?

Ya, dre c'hras Doue.

3. Petra eo eur c'hristen mat ?

Eur c'hristen mat a zo eun den badezet, a gred hag a heuilh ar relijion gristen.

4. Petra eo ar relijion gristen ?

Ar relijion gristen eo an hini a zo bet desket d'an dud gant Jezuz-Krist e-unan, p'edo o veva war an douar, hag a vez desket d'eomp bremañ eus e berz gant an Iliz santel.

5. Petra a zo er relijion gristen ?

Ar relijion gristen a zo enni :

1^a (da genta) : ar gwirioneziou da gredi;

2^a (d'an eil) : ar goure'hemennou da heulia;

3^e (d'an trede) : ar sakramanchou da reseo.

6. E-pelec'h eo merket ar gwirioneziou da gredi ?

Ar pep brasa eus ar gwirioneziou-se a zo merket er « Gredo ».

✠ *Lavarit ar « Gredo » e brezoneg.*

Me a gred e Doue... (paj. 107).

Da lenn :

AN DAOUZEK ABOSTOL

Daouzek abostol en doa Jezuz : Per hag Andre, Jakez ha Yann, Filip ha Bartolome, Tomaz ha Maze, Jakez ha Simon, Jud ha Judaz. Per eo a zeuas da veza maen-diazez an Iliz hervez komz Hor Salver; bet eo ar Pab kenta.

Yann, an abostol muia-karet gant Jezuz, en deus skrivet ar pevare aviel ha levr an Apokalips.

Maze a skrivas an aviel kenta.

Judaz, an trubard, eo a werzas e vestr.

A-raok kimiada diouz e ebstel, Jezuz o c'hasas da brezeg an aviel dre ar bed holl : « It, kelennit an holl boblou,.. o badezit en ano an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel. »

Dre an ebstel eo deuet d'eomp ar gwirioneziou a zo merket er « Gredo ».

Da ober : Me a zesko mat va c'hatekiz.



Doe, eus a netra, en deus krouet pep tra.
Ni a dle anaout, karout ha servija Doue.

(2¹) EIL KENTEL

1. *Petra eo kenta tra a zesk d'eomp ar Gredo ?*

Kenta tra a zesk d'eomp ar Gredo, eo ez eus eun Doue.

✠ 2. *Petra eo Doue ?*

Doue a zo eur spered pur, peurvat ha peurbadus; heñ eo krouer ha mestr ar bed.

3. *Ha Doue a zo bet atao ?*

Ya, Doue a zo bet a-holl viskoaz hag a vezo da-viken.

✠ 4. *E-pelec'h emañ Doue ?*

Doue a zo en Neñv, war an douar, hag e pep lec'h.

5. *Ha Doue a zo holl-c'halloudek ?*

Ya, mestr eo war bep tra hag ober a c'hell ar pez a gar.

✠ 6. *Ha Doue a wel pep tra ?*

Ya, Doue a wel asambles ar pez a zo bet, a zo hag a vezo, ha lenn a ra er c'halonou ar sonjou ar muia kuzet.

7. *Ha Doue a zo just ?*

Ya, Doue a zo just. Ha gantañ pep-hini a gav atao diouz ma ra.

8. *Ha Doue a zo trugarezus ?*

Ya, Doue a zo trugarezus; c'hoant en deus da savetei an holl, ha pardoni a ra d'ar vrasa pec'herien, p'o devez keuz da veza e ofanset.

Da lenn :


FIZIAÑS E PROVIDAÑS DOUE

« N'en em chalit ket re... gant ar pez ho pezo da zebri pe da eva na... gant ar pez ho pezo d'en em wiska. Gwelit al laboused : ne hadont na ne eostont... Ho Tad hag a zo en Neñv, a ro d'ezo bevañs...

Gwelit bleuniou ar parkeier : ne labouront na ne nezont. Ha koulskoude hel lavarant d'eoc'h : Salomon e-unan, e barr e vrud, n'eo ket bet gwisket ken kaer hag ar bleuniou-se... »

(Diwar *St Vaze VI 25-29*.)

Da ober : Me a sonjo alies emañ lagad Doue o para warnoun.



Sant Yann Vadezour o vadezi Jezuz.

(3^e) TREDE KENTEL

1. *Petra eo eur mister santel ?*

Eur mister santel a zo eur wirionez eus hor relijion ha n'hellomp ket kompren.

2. *Perak e tleomp kredi ar misteriou santel ?*

O c'hredi a dleomp, abalamour m'int bet disklriet d'eomp gant Doue ha ne c'hell Doue na fazia nag hon lakaat da fazia.

3. *Peré eo brasa misteriou ar relijion ?*

Mister an Dreinded, mister an Emzenadur (Inkarnasion) ha mister an Dasprenadur (Redempcion).

✠ 4. *Pehini eo merk ar c'hristen ?*

Sin ar Groaz eo.

✠ 5. *Penaos e vez graet sin ar Groaz ?*

Sin ar Groaz a vez graet o kas an dorn dehou d'an tal, ac'hano d'ar stomok, goude-se d'ar skoaz kleiz, ac'hano d'an hini zehou en eur lavarout : en ano an Tad, hag ar Mab hag ar Spered-Santel. Evel-se bezet graet.

Pe e latin : In nomine Patris et Filii et Spiritus sancti. Amen.

MISTER AN DREINDED

✠ 6. *Petra eo mister an Dreinded ?*

Eun Doue hepken e tri ferson : an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel.

7. *Ha n'eus nemet eun Doue hepken ?*

Nann, n'eus ha ne c'hell beza nemet eun Doue hepken.

8. *Ha tri ferson a zo e Doue ?*

Ya, tri ferson a zo e Doue : an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel.

9. *Ha par eo an tri ferson-se an eil d'egile e pep tra ?*

Ya, ken bras ha ken galloudus int an eil hag egile, hag a-holl viskoaz ez eus anezo o zri.

Da lenn. — En amzer ma stagas da brezeg an aviel, Jezuz a zeuas war ribl ar stêr Jourdan da c'houlenn digant Sant Yann Vadezour ar vadeziant a binijenn.

P'edo Jezuz o tont er-maez eus an dour, e tiskennas warnañ ar Spered-Santel dindan furm eur goulm : hag eur vouez a voe klevet, mouez Doue an Tad, hag a lavare : Hemañ eo va mab muia-kraet...

Ha setu roet da anaout d'an dud ez eus tri ferson e Doue.

Da ober : Me a raio sin ar groaz gant feiz.



Tri ael a yeas a-berz Doue betek Abraham hag a lavaras d'ezañ : « Eur mab az pezo, Izaag a vezo e ano; eus e lignez e tiskenno ar Mesiaz ».

(4^{vet}) PEDERVET KENTEL

1. *Pere eo ar re wella eus an holl grouadurien ?*

An Aelez hag an dud.

2. *Petra eo an aelez ?*

An aelez a zo sperejou pur krouet gant Doue evit e veuli hag e servija.

3. *Ha chomet eo bet mat an holl aelez ?*

Nann, darn hepken : an aelez mat eo ar re-se. Darn all a zo en em savet ouz Doue, ar re-mañ eo an aelez fall, an drouksperejou, an diaoulou.

4. *Ha karget eo an aelez mat da ziwall an dud ?*

Ya, Doue en deus roet eun ael mat da bep den evit e ziwall hag e hencha.

5. *Pere eo hon deveriou e-keñver hon ael mirer ?*

Ni a dle kaout resped hag anaoudegez vat evit hon ael mirer ha beza leun a fiziañs ennañ.

6. *Ha klask a ra an drouksperejou noazout d'an dud ?*

Ya, alies e vezont war hon tro o klask hon dougen d'an droug hag hor sacha ganto d'an ifern.

7. *Ha trec'hi a c'hellomp war'an drouk-sperejou ?*

Ya, gant sikour Doue; morse ne gouezomp er pec'hed en desped d'comp.

Da lenn. — Pep kristen mat a lavar bemdez, mintin ha noz, ar bedennig-mañ d'e ael-mirer :

« C'houi, va ael mat, kannad Doue,
Mirit va c'horf ha va ene ;
Na lezit ket an droukspere
D'am chadenna dre ar pec'hed. »



Da ober : Me a zesko ar bedennig-se hag he lavaro alies.



Pec'hed hon tad hag hor mamm genta.

(5^{vet}) PEMPVET KENTEL

1. *Petra a ro Doue d'an den ouz e lakaat er bed ?
Doue a ro d'an den eur c'horf hag eun ene.*

2. *Pe ar c'horf pe an ene eo al lodenn wella eus an den ?*

An ene eo al lodenn wella, abalamour ma'z eo eur spered ha ne varv ket, krouet he vel ouz Doue, ha gouest d'e anaout ha d'e garout.

✠ 3. *Evit petra en deus Doue krouet an den ?*

Doue en deus krouet an den evit e anaout, e garout, e servija, ha gounit evel-se ar baradoz.

4. *Pere eo an daou zen kenta krouet gant Doue ?*

Adam hag Eva, anvet hon tad hag hor mamm genta, abalamour m'eo deuet an holl dud anezo o-daou.

5. *E pe stad e krouas Doue Adam hag Eva ?*

Doue a grouas Adam hag Eva en eur stad santel hag o lakaas e baradoz an douar.

6. *Ha sentus int bet alao ouz Doue ?*

Nann, disenti o deus graet o tebri eus ar frouez difennet outo hag abalamour da-se e teuomp holl war an douar er stad a bec'hed.

7. *Penaos e vez anvet ar pec'hed a zeu ganeomp war an douar ?*

Ar pec'hed orijinel.

8. *Piou a zo bet diwallet diouz ar pec'hed orijinel ?*

Ar Werc'hez Vari; hi hepken a zo bet diwallet diouz ar pec'hed orijinel; setu perak e vez lavaret eo bet « konsevet dinamm ».

Da lenn : Doue a dennas korf an den kenta eus an douar, ha d'ar c'horf-se e roas eun ene.

Goude e lavaras : « N'eo ket mat e chomie ar gwaz e-unan ». Hag e krouas ar vaouez.

Adam hag Eva, touellet gant an droukspered, a zisentas ouz Doue. Koll a rejont e c'hras; kaset e voent er-maez eus baradoz an douar; ar boan a gouezas warno, hag ar maro goude.

Dre zisentidigez hon tud kenta e teuomp holl war an douar er stad a bec'hed, techet d'an droug ha kondaonet ivez d'ar boan ha d'ar maro.

Da ober : Me a gaso an droukspered diwar va zro, pa glasko va dougen d'ar pec'hed.



An arc'hael Gabriel, stouet dirak ar Werc'hez Vari, a ro d'ezi da anaout e vezo mamm da Zoue.

(6^{vet}) C'HOUEC'HVET KENTEL

1. *Ha Doue a zilezas an dud goude ar pec'hed orijinel ?*

Nann; prometi a reas d'ezo eur Salver.

2. *Piou eo ar Salver-se ?*

Ar Salver-se eo Jezuz-Krist.

✠ 3. *Piou eo Jezuz-Krist ?*

Jezuz-Krist eo mab Doue en em c'hraet den evit hor savetei.

4. *Penaos eo mab Doue en em c'hraet den ?*

O kemerout eur c'horfi hag eun ene heñvel ouz hon re-ni e korfi ar Werc'hez Glorius Vari.

5. *Ha Jezuz-Krist a zo gwir Doue ?*

Ya, pegwir eo mab da Zoue ha par d'e Dad e pep tra.

6. *Ha Jezuz-Krist a zo gwir den ?*

Ya, pegwir en deus eveldomp eur c'horfi hag eun ene.

✠ 7. *Penaos e vez anvet mister mab Doue en em c'hraet den ?*

Mister mab Doue en em c'hraet den a vez anvet mister an Emzenadur (Inkarnasion).

Da lenn. — Pec'hed hon tud kenta a roas tro da Zoue da ziskouez d'eomp e garantez divent.

Gellet en dije ober d'eomp evel d'an aelez fall. Hag en deus roet d'eomp e Vab evit hon dasprena.

Kantvejou ha kantvejou a-raok ganedigez Jezuz, e lavaras ar brofeted e vije mab d'eur werc'hez, e teuje er bed e Betleem, e vije gwelet rouaned o stoui dirazañ, e vije lakaet d'ar maro evidomp....

Piou eo an den a zo bet ano anezañ evel-se, ha gortozet gant ar bed pell-pell a-raok e c'hanedigez ?

Den ebet, nemet-an Den-Doue, Hor Salver Jezuz-Krist.

Da ober : Me a zesko hag a lavaro an « Angelus », a zegas sonj d'ar gristenien, teir gwech bemdez, en deus Mab Doue en em c'hraet den evit silvidigez ar bed.



Ganet eo ar Mabig Jezuz e kraouig Betleem.

(7^{vet}) SEIZVET KENTEL

1. *Hag ar Werc'hez Vari a zo mamm da Zoue ?*

Ya, pegwir he deus lakaet er bed eur mab hag a zo Doue.

2. *Ha mamm eo ar Werc'hez Vari d'eomp-ni ivez ?*

Ya, rak dre ar vadeziant omp breudeur da Jezuz, ha diwar e groaz en deus he roet d'eomp da vamm.

3. *Piou eo Sant Jozef ?*

Sant Jozef eo pried ar Werc'hez Vari ha tad mager Jezuz.

✠ 4. *Pe da zeiz eo bet ganet Jezuz-Krist ?*

Jezuz-Krist a zo bet ganet da zeiz Nedeleg en eur c'hraou e Betleem.

✠ 5. *E-pelec'h e tremenas an tregont vloaz kenta eus e vuhez ?*

O zremen a reas e Nazaret o pedi, o labourat hag o senti.

✠ 6. *Petra a reas e-pad an tri bloaz diweza eus e vuhez ?*

E-pad an tri bloaz diweza eus e vuhez, Jezuz a brezegas an Aviel e bro Palestin en eur ober burzudou bras.

7. *Petra eo an Aviel ?*

An Aviel eo ar c'helou mat degaset d'an dud gant Jezuz.

8. *Peseurt kelou mat a zegasas Jezuz d'an dud ?*

Jezuz a roas da anaout d'an dud e oa mab Doue, deut da savetei ar bed.

Da lenn :

Sentus ouz urziou gouarnamant Rom, Mari ha Jozef a guitaas Nazaret evit mont da Vetelem. Degouezet eno, ne gavjont lojeiz e ti ebet.


En eur c'hraou eo e teuas ar Mabig Jezuz er bed.

Pastored a ziwalle o loened demdost. Eun ael en em ziskouezas d'ezo hag a lavaras : « Eur c'helou laouen a zegasan d'eoc'h. Ganet ez eus bet evidoc'h hirio eur Salver... ».

Neuze e voe klevet eun niver bras a aelez o kana en noz sklerijennet : « Gloar da Zoue e barr an Neñv, ha peoc'h war an douar d'an dud a volonteiz vat ».

(Hervez St Lukaz II).


Da ober : Evel Jezuz, me a bedo, a labouro hag a sento.




Evel ma kemeras preder da savetei Moizez,
Doue a gemer preder gant e holl vugale.



Doue ne zilzas ket an dud goude o fec'hed.
Prometi a reas d'ezo eur Salver : Jezuz-Krist.



Gant aon na vefe lakaet d'ar maro gant ar roue Herodez,
Mari ha Jozef a dec'h d'an Ejipt gant ar Mabig Jezuz.



Bro Palestin, e-lec'h m'eo bet ganet Jezuz,
a zo pell diouz Breiz.



Da vintin ar Sul-Fask, Jezuz a sav eus ar bez
leun a vuhez, dre e nerz e-unan.

(8^{vet}) EIZVET KENTEL

1. Hag ar Juzevien a anavezaz Jezuz-Krist evit mab da Zoue ?

Nann, ober a rejont brezel d'ezañ en desped d'e vadoberou ha d'e vuzudou, ha goulenn a rejont ma vije lakaet d'ar maro.

✠ 2. Petra eo mister an Dasprenadur (Redemption).

Mister an Dasprenadur eo mister Jezuz-Krist maro war ar groaz evit dasprena an holl dud.

✠ 3. Pe da zeiz eo maro Jezuz-Krist ?

Da zeiz gwener ar Groaz, war ar Menez Kalvar, e-kichen kêr Jeruzalem.

4. Evit petra eo maro Jezuz-Krist ?

Jezuz-Krist a zo maro evit kinnig d'e Dad eur sakrifiis peurvrat, hon tenna eus ar stad a bec'hed ha meritout d'eomp ar Baradoz.

5. Pe da zeiz eo savet Jezuz-Krist a varo da veo ?

Jezuz-Krist a zo savet a varo da veo d'ar Sul-Fask, an trede deiz goude e varo.

6. Petra a reas Jezuz-Krist goude e rezureksion ?

Chom a reas daou-ugent devez war an douar, en em ziskouez a reas alies d'e ziskibien, ha rei a reas d'ezo e genteliou diweza.

7. Pehini eo ar brasa burzud a reas Jezuz-Krist evit diskouez e oa Doue ?

An hini a reas o sevel e-unan a varo da veo.

Da lenn. — Er wech kenta m'en em ziskouezaz Jezuz d'e ebestel, goude beza savet a varo da veo, n'edo ket Tomaz ganto. Setu ma lavarjont d'ezañ :

« Ni hon eus gwelet ar Mestr ! »

« Ma ne welan ket roud an tachou en e zaouarn, ma ne lakaan ket va biz war e c'houliou ha va dorn en e gostez, ne gredin ket », eme Domaz.

Eiz devez goude, en em gavas Jezuz adarre e-touez an ebestel, ha Tomaz a oa ganto. Jezuz a lavaras d'ezañ :

« Laka da viz amañ, Tomaz; sell ouz va daouarn; tosta da zorn ha laka anezañ e gouli va c'hostez; na vez ket diskredik, met kred bremañ ! »

Tomaz a respontas :


« Va Doue ha va Mestr ! »

(Hervez St Yann XX - 24 - 28).


Da ober : Pa dremenin dirak eur c'halvar, me a raio atao sin ar Groaz.




D'e zaouzek vloaz, Jezuz a yeas da Dempl Jeruzalem. Doktored al lezenn a chom mantret o welout e skiant hag e furnez.




A-raok mont da brezeg e Aviel, Jezuz a dremenas daou-ugent devez en eur gouelec'h (dezert).
An diaoul a zeuas d'e denti.
Jezuz her c'hasas diwar e dro : « Kerz kuit, Satan, rak skrivet eo : Doue, da vestr, a adori, ha ne servi nemetañ... »



Da eured Kana, Mari a lavaras d'he Mab : n'o deus mui a win. War c'houlenn e vamm, Jezuz a reas e vuzud kenta o trei an dour e gwin.



Jezuz a ro ar pare d'eun den seizet (skoet).
« Me her c'hemenn d'it, sav, samm da wele, ha kerz d'ar gêr ».



Jesus o pignat d'an Neñv

(9^{vet}) NAVET KENTEL

✠ 1. *Pe da zeiz eo pignet Jezuz-Krist d'an Neñv ?*

Da zeiz ar Yaou-Bask, daou-ugent devez goude e rezureksion.

2. *Petra a lavarit dre ar c'homzou : « ac'hano e teuy da varn ar re veo hag ar re varo » ?*

Dre ar c'homzou-se, **me a lavar e tiskenno adarre Jezuz-Krist war an douar da fin ar bed, evit barn an holl dud.**

3. *Petra a lavarit dre ar c'homzou : « Me a gred er Spered-Santel » ?*

Dre ar c'homzou-se, **me a lavar ez eus eun trede personaj en Dreinded Sakr anvet ar Spered-Santel hag a zo Doue evel an Tad hag ar Mab.**

4. *Ha gwelet eo bet a-wechou ar Spered-Santel o tiskenn eus an Neñv ?*

Ya, ar Spered-Santel a zo bet gwelet o tiskenn eus an Neñv dindan furm eur goulm, pa voe badezet Hor Salver, ha dindan furm teodou tan da zeiz ar Pantekost.

5. *Petra a ra ar Spered-Santel en Iliz ?*

Ar Spered-Santel a ro d'an Iliz sklerijenn, santelez ha skoazell.

6. *Petra a ra ar Spered-Santel en eneoù ?*

En eur ziskenn en eneoù, ar Spered-Santel a ro d'ezo ar c'hras-santelaat, sklerijenn ha nerz d'ober ar mad ha d'en em ziwall diouz an droug.

Da lenn : D'ar Yaou-Bask, diwar menez an Olived, Jezuz a bignas d'an Neñv dirak e ziskibien, goude beza prometet d'ezo ar Spered-Santel : « Pa ziskenno warnoc'h ar Spered-Santel, e vezoc'h karget a nerz ». Neuze e voe gwelet o sevel dirazo, hag eur goumoulenn a guzas anezañ outo.

Daou ael gwisket e gwenn ha skedus a zeuas e-kichen an diskibien hag a lavaras d'ezo :

« Gwazed a C'halile, perak e chomit da sellout ouz an Neñv, mantret. Ar Jezuz-se hoc'h eus gwelet o sevel d'an Neñv, a ziskenno adarre en doare m'eo pignet ».

(Hervez « Oberou an Ebestel » I).

Da ober : Me a vevo er stad a c'hras, evit ma chomo ar Spered-Santel em c'halon.

Komunia a rin ivez d'ar Yaou-Bask, a zo unan eus kaera goueliou ar bloaz kristen.



An Iliz eo Hon Tad Santel ar Pab, an eskibien, ar veleien, an holl gristenien fidel a bep bro.

(10^{vet}) DEKVET KENTEL

✠ 1. *Petra eo an Iliz ?*

An Iliz eo an holl gristenien gouarnet gant hon Tad santel ar Pab ha gant an eskibien a zo a-unan gant ar Pab.

2. *Petra eo ar Pab ?*

Ar Pab, hag a zalc'h plas Sant Per, eo vikel Jezuz-Krist, penn an Iliz war an douar ha tad an holl gristenien.

3. *Petra eo an eskibien ?*

An eskibien eo ar re a zalc'h plas an ebestel hag a c'houarn an eskoptiou a-unan gant ar Pab.

4. *Piou en deus savet an Iliz ?*

Hor Salver Jezuz-Krist.

5. *Gant piou eo sikouret an eskibien ?*

Gant ar veleien, ha dreist-holl gant ar bersoned a zo lakaet gant an eskibien e penn ar parrezioù.

6. *Ha fazia a c'hell an Iliz, pa zesk ar relijion d'an holl dud fidel ?*

Nann ; Jezuz-Krist en deus prometet d'ezi e vefe ganti bepred evit he diwall diouz pep faz.

7. *Ha savet en deus Jezuz-Krist ouspenn eun Iliz ?*

Nann ; Jezuz-Krist n'en deus savet nemet eur gwir Iliz, hag, er-maez eus an Iliz-se, ne c'heller ket beza savet.

8. *Pere eo ar merkou evit anaout ar gwir Iliz ?*

Ar gwir Iliz a zo unan, santel, katolik hag abostolik.

Da lenn :

Eun deiz, Jezuz a c'houlennas ouz an ebestel : « Piou oun hervez an dud » ?

An ebestel a respontas : « hervez lod eus an dud, ez oc'h Yann Vadezour ; hervez lod all, ez oc'h Eliaz, Jeremiaz, pe unan eus ar brofeted ».

« Ha c'houi, evit piou am c'hemerit » ?

Per a respontas : « c'houi eo ar C'hrist, mab an Doue beo ».

Jezuz a lavaras da Ber :

« Ha me a lavar d'it ez out Per, da lavarout eo maen, ha, war ar maen-se, me a ziazezo va Iliz ; ha morse ne vezo trec'h an ifern d'ezi. Rei a rin d'it alc'houezioù rouantelezh an Neñv. Kement a liammi war an douar, a vezo liammet en Neñv ; kement a ziliammi war an douar, a vezo diliammet en Neñv ».

(*Sant Vaze XVI*).

Dre ar c'homzou-se, Jezuz a lakaas e penn an Iliz Sant Per hag ar babed a deus azeza war gador Sant Per e Rom.

Da ober : Me a bedo evit an Iliz hag evit an Tad Santel ar Pab.



Lazar hag ar piavidig fall.

(11^{vet}) UNNEKVET KENTEL

1. *Petra a lavarit dre ar c'homzou : Komunion ar Sent ?*

Dre ar c'homzou-se, me a lavar eo an holl gristenien fidel evel izili eur memes korf hag o deus perz holl er memes madou-ene.

2. *Petra a lavarit dre ar c'homzou : me a gred er vuhez peurbadus ?*

Dre ar c'homzou-se, me a lavar e vezo goude ar vuhez-mañ eur vuhez all ha ne vezo fin ebet d'ezi.

3. *Pere eo finvezioù diweza an den ?*

Ar maro, ar varn, ar baradoz pe an ifern.

4. *Petra eo ar maro ?*

Ar maro a zo eun disparti etre ar c'horfi hag an ene.

5. *Peur e varvimp-ni ?*

N'ouzomp nag an deiz nag an eur, rak-se e tleomp beza atao prest da rei eun ene mat da Zoue.

6. *Petra a zeu ar c'horf da veza goude ar maro ?*

Goude ar maro, ar c'horfi a zistro d'an douar hag a zeu da vreina, betek ma savo adarre da fin ar bed, leun a vuhez.

✠ 7. *Petra a zeu an ene da veza goude ar maro ?*

Diustu goude ar maro, an ene a vez barnet gant Doue ; setu ar pez a anver ar varn genta.


Da lenn :

« Selaou, va breur ker,
Buan 'red an amzer,
Tremen 'ra pep tra :
Nerz, madou, yec'hed,
Yaouankiz ha gened.
Tremen 'ra pep tra,
Tremen 'ra pep tra ».

Ar c'hantik a lavar d'eoemp eo berr buhez an den war an douar. Hor Salver Jezuz-Krist a lavar heñvel : « Bezit war evez, pegwir n'ouzoc'h ket peur e teuio ho mestr... Bezit prest... Mab Doue a zeuio d'an eur ma sonjoc'h an nebeuta ».

(Sant Vaze XXV, 42-44).

Da ober : Pa glevin glaz o seni, me a lavaro eur bedenn evit an ene a zo aet d'ar bed all.



D'ar varn ziweza e vezo graet an disparti. Ar re fall a vezo stlapet en ifern. Ar re vat a yelo gant Doue d'e varadoz.

(12^{vet}) DAOUZEKVET KENTEL

1. *Da-belec'h ez a an ene goude ar varn genta ?*

Goude ar varn genta, an ene a ya d'ar Baradoz, d'ar Purgator, pe d'an Ifern, diouz m'en devez meritet.

2. *Petra eo ar Baradoz ?*

Ar Baradoz a zo eul lec'h dudius, hag eno an aelez hag ar sent a vezo eürus da-viken, o welout hag o karout Doue.

✠ 3. *Piou a ya d'ar Baradoz ?*

Ar re a varv er stad a c'hras hag o deus peurbæet o dle da justis Doue.

4. *Petra eo ar Purgator ?*

Ar Purgator a zo eul lec'h a boan hag a chom ennañ an dud just da beurober o finijenn a-barz mont d'ar Baradoz.

5. *Piou a ya d'ar Purgator ?*

Ar re a varv er stad a c'hras ha n'o deus ket peurbæet o dle da justis Doue.

6. *Petra eo an Ifern ?*

An Ifern a zo eul lec'h spontus, hag eno an dud fall a vezo da-viken dalc'het pell diouz Doue ha gwallgaset gant an drouksperjous.

✠ 7. *Piou a ya d'an Ifern ?*

Ar re a varv er stad a bec'hed marvel.

Da lenn. — Jezuz en deus diskleriet d'eomp petra e vezo ar varn ziweza.


Pa ziskenno eus an Neñv en e c'hloar da varn an holl dud, e raio diou lodenn anezo. Lakaat a raio ar re vat en tu dehou d'ezañ, ar re fall en tu kleiz. D'ar re vat e lavaro : « deuit, tud benniget gant va Zad, deuit da gemerout ho lod er rouantelez a zo bet pourchaset d'eoc'h abaoe ar penn kenta eus ar bed... ».

Goude e lavaro d'ar re a vezo en tu kleiz d'ezañ : « It pell diouzin, tud milliget, it d'an tan peurbadus a zo bet c'houezet evit an diaoul hag an aelez fall... ».


(*Hervez Sant Vaze, XXIV*).

D'an dud daonet, poaniou kriz an Ifern.... D'an dud salvet, eürusted ar Baradoz !


Da ober : Me a zesko an « de profundis », eur bedenn gaer da lavarout evit an dud a zo aet da anaon.



Ar besketerez vuzudus. — Jezuz a lavaras d'an ebestel : « It en doun-vor, ha taolit ho rouejou. Per a respontas : « A-hed an noz hon eus poaniet, en aner. Pegwir avat e kemennit, e taolin adarre va roued ». Kement a besked a bakjont, ma roge ar roued ha ma oa leun an diou vag.




Ar gristenien vat hag ar vugale vat a sikour Jezuz da zougenn e groaz, oc'h unani bemdez o foaniou gant e re.



Izili an Iliz eo **an holl dud vadezet** a zo er stad a c'hras, pe zoken er stad a bec'hed, nemet distaget e vefent diouti dre an erezi, ar chism pe an eskumunugenn.



Ar Vretoned oc'h en em gavout e Breiz... I eo o deus degaset d'eomp sklerijenn ar Feiz... **Dalc'homp mat d'ezi !**



War ar Menez Sinaï, Doue a ro da Voizez taolennou al lezenn, warno an dek gourc'hemenn.

(13^{vet}) TRIZEKVET KENTEL

1. *Penaos e renomp eur vuhez vat ?*

Pa reomp hervez hor c'houstiañs an deveriou merket d'eomp gant Doue.

2. *Ha buhez vat a c'hell beza gant an dud dizoue ?*

Nann ; diaes bras eo d'an dud dizoue ren eur vuhez vat.

3. *Perak an dra-se ?*

Abalamour m'eo ret d'an den, evit chom en e reiz, kaout doujañs evit eur Mestr a wel e holl oberou hag a zo gouest da rei da bep-hini diouz ma ra.

4. *Petra eo ar goustiañs ?*

Ar goustiañs eo skiant an den, pa lavar d'ezañ petra a zo mat ha petra a zo fall da ober.

5. *E-pelec'h eo merket hon deveriou ?*

Ar pep brasa eus hon deveriou a zo merket e gourc'hemennou Doue hag e re an Iliz.

6. *Lavarit gourc'hemennou Doue ?*

Eun Doue hepken a adori... (p. 108).

7. *Lavarit gourc'hemennou an Iliz ?*

Ouspenn ar sul, a-hed ar bloaz... (p. 108).

8. *Hag eun dever eo d'eomp gouzout ar gourc'hemennou-se ?*

Ya, eun dever eo d'eomp o gouzout, ha mat eo o lavarout alies.

Da lenn :

Eun doktor war lezenn Moïsez a c'houlennas eun deiz ouz Jezuz :
« Mestr, pehini eo ar brasa eus ar gourc'hemennou » ?
Jezuz a lavaras d'ezañ :

« Karout a ri an Aotrou Doue a-greiz kalon, gant da holl ene, gant da holl spered. Henez eo ar brasa hag ar c'henta gourc'hemenn. An eil a zo heñvel outañ : Karout a ri da nesa evel d'ur da-unan. En daou c'hourc'hemenn-se emañ al lezenn penn-da-benn ha kelennadurez ar Brofeted.

(Sant Vaze XXII, 35-40).

Da ober : Bemdez, em fedennou, mintin ha noz, me a lavaro ar gourc'hemennou evit derc'hel sonj mat anezo.



An tri roue a ginnig d'ar Mabig Jezuz aour, ezañs ha mirh :
aour da verka eo roue, ezañs da verka eo Doue, mirh da verka eo den.

(14^{vet}) PEVARZEKVET KENTEL

*Eun Doue hepken a adori
Ha dreist pep tra holl a gari.*

1. *Petra a ordren d'eomp kenia gourc'hemenn Doue ?*
Kenta gourc'hemenn Doue a ordren d'eomp e adori hag e garout.
2. *Petra eo adori Doue ?*
Adori Doue a zo anaout hag enori anezañ evel Krouer ha Mestr ar bed.
3. *Hag adori a dleomp ivez Hor Salver Jezuz-Krist ?*
Ya, adori a dleomp ivez Hor Salver Jezuz-Krist, abalamour ma 'z eo Doue.

4. *Penaos e ro ar bobl kristen da Zoue an enor a zo dleet d'ezañ ?*

O vont d'an oferenn, d'ar gousperou ha da gement lid pe bedenn a vez graet en ilizou.

5. *Petra a ordren d'eomp c'hoaz ar c'henta gourc'hemenn ?*

Ar c'henta gourc'hemenn a ordren d'eomp c'hoaz enori ar Werc'hez. an aelez hag ar sent.

6. *Penaos e pec'her enep ar c'henta gourc'hemenn ?*

**Oc'h adori ar falz-doueou,
O veva hep relijion,
O tegemerout treuz-kredennou,
Hag oc'h ober sakrilajou.**

7. *Penaos e vez graet eur sakrilaj ?*

O tisprizout an traou sakr hag o teurel dismeganñ war an dud gouestlet da Zoue.

Da lenn : Eun devez, skuiz o vale, Jezuz a chomas a-sav e-tal eur puñs tost da gêr Sichar. Eur Samaritanez deuet da gerc'hat dour, oc'h anaout ennañ eur profed, a lavaras d'ezañ :

« Hon tadou-ni o deus adoret Doue war ar menez-mañ (Menez Garizim), ha c'houi, Juzevien, a lavar eo e Jeruzalem e tle Doue beza adoret .

« Maouez, va c'hredit, eme Jezuz. tostaat a ra ar mare ma ne vezo ket adoret an Tad na war ar menez-mañ nag e Jeruzalem... Tostaat a ra ar mare, ha deuet eo, ma vezo adoret Doue a spered hag e gwirionez ».


Ar Samaritanez a respontas :

« Gouzout a ran emañ ar Mesiaz war-nes dont. Pa vezo deuet, e tesko d'eomp pep tra ».

« Ar Mesiaz, me eo, a respontas Jezuz, me hag a zo o komz ganeoc'h ».

(Hervez St Yann IV).

Da ober : Me a adoro an Aotrou Doue a spered ivez, ha n'eo ket hepken diwar beg va zeod.



Ar Sirian Éliodor, deuet da Jeruzalem da laerez listri sakr ha teñzoriou an Templ, a zo ruilhet, breset, kannet gant aelez Doue. An iliz eo ti an Aotrou Doue. En em zalc'homp mat en iliz !

(15^{vet}) PEMZEKVET KENTEL

*Na dou ket ano mestr ar bed,
Ma n'ec'h eus abeg mat ebet.*

1. Petra a zifenn ouzomp eil gourc'hemenn Doue ?

Eil gourc'hemenn Doue a zifenn ouzomp :
da genta : **toui hep abeg mat ebet,**
d'an eil : **blasfemi,**
d'an trede : **mañkout d'hor gouestlou** (veuiou).

2. Petra eo toui ?

Toui, pe ober le, a zo **kemer Doue da dest eo gwir ar pezh a lavarar.**

3. Ha toui a c'heller, pa vez eur rezon vras ?

Ya, toui a c'heller, pa vez eur rezon vras bennak, evel pa lavar ar barnar sevel an dorn da rei testeni d'ar wirionez.

4. Petra eo blasfemi ?

Blasfemi a zo **gwall gomz eus Doue, eus ar sent pe eus ar relijion, ha beza diresped ouz ano Doue.**

5. Petra eo gouestla pe ober veu ?

Gouestla, pe ober veu, a zo **prometi da Zoue eun dra vat bennak dindan boan a bec'hed.**

6. Ha mat eo gouestla ?

Ya, mat eo gouestla, met arabat hen ober re vuan hag hep gouenn kuzul.

Da lenn. — E-pad m'edo pennou bras ar bobl o kondaoni Hor Salver d'ar maro, Per, an abostol bras, a oa er-maez o tomma. Kemeret evit unan eus diskibien Jezuz, e nac'has e Vestr :

« Toui a ran, emezañ, n' anavezan ket an den-se ».

(Hervez Sant Mark XIV).

Per a douas war ar gaou hag a reas eur pec'hed bras !


Antronoz edo Jezuz ouz ar groaz, o vont da rei e vuez evit an dud. Ar Juzevien digalon a ra goap anezañ :

« Saveteet en deus ar re-all, ha n'eo ket gouest d'en em savetei e-unan.... Diskenn diwar e groaz... hag e kredimp eunañ.... Ma 'z eo karet gant Doue, ra zeuio Doue bremañ d'hen distaga » !

(Hervez Sant Vaze XXVII).

Blasfemou euzus eo ar goaperez-se !

Da ober : Me a lavar gant resped ha karantez ano santel Jezuz.



An oferenn da sul : ar brezegenn.

(16^{vet}) C'HOUEZEK^{VET} KENTEL

*Ar suliou santel a viri
D'enori Doue, d'e bedi.*

1. *Petra a ordren d'eomp trede gourc'hemenn Doue ?
Trede gourc'hemenn Doue a ordren d'eomp
santelaat ar sul.*

2. *Petra a ranker ober evit santelaat ar sul ?*

Evit santelaat ar sul, e ranker :

- 1a) Da genta : **mont d'an oferenn,**
- 2) D'an eil : **chom hep labourat,**
- 3e) D'an trede : **diwall diouz ar plijadurioù fall.**

3. *Penaos e tleer klevout an oferenn ?*

**Ret eo klevout an oferenn penn-da-benn gant
evez ha gant devoision.**

4. *Pere eo al labouriou a zo difennet da sul ?*

**Al labouriou difennet da sul eo al labouriou n'int
ket ret ha n'emañ ket ar c'hiz anezo da sul.**

5. *Ha labourat a c'heller a-wechou da sul ?*

**Ne c'heller labourat da sul nemet eur rezon
vras bennak a vefe; ha ma tle al labour beza
graet a-wel d'an holl, eo ret goulenn aotre.**

6. *Ha kemerout a c'heller ar blijadur da sul ?*

**Ya, gant ma vezo onest ar blijadur ha ma
vezo graet da genta an deveriou a relijion.**

Da lenn : D'e zaouzek vloaz, Jezuz a yeas da Jeruzalem evit
gouelioù-Pask, gant ar Werc'hez Vari ha Sant Jozef. Da boent an
distro e voe kollet diouz e gerent. Mari ha Jozef a zeuas a-benn d'e
gaut goude tri devez, en Templ, e-touez an doktored, a chome mantret
gant e furnez. Mari a lavaras d'ezañ :

« Va mab, perak hoc'h eus graet d'eomp eun taol evel-se ? Ho tad
ha me ho klaske, nec'het maro ».

Jezuz a respontas d'ezo :


« Perak va c'hask ? Ñe ouiec'h ket 'ta e tlean-me beza gant
aferiou va Zad ? »

(Hervez St Lukaz II).

E-pad c'houec'h devez ar sizun e vezomp gant aferiou an douar.
Da sul e tleomp beza gant aferiou hon Tad, gant aferiou hon ene.

Hon tud koz a lavare : « Pe ofern pe ifern ? — « Labour sul,
labour nul »... Ar wirionez eo!

**Da ober : Me a yelo d'an oferenn bep sul hag a
lezo a-gostez pep labour difennet.**



Ar Familh Santel eo skouer an holl familhou kristen.

(17^{vet}) SEITEKVET KENTEL

*Da dad, da vamm a enori,
Evit pell amzer ma vev.*

✠ 1. *Pere eo deveriou ar vugale e-keñver o zad hag o mamm ?*

Ar vugale a dle karout o zad hag o mamm, o enori, senti outo, hag o sikour en o ezommoù.

2. *Perak e tleomp enori hon tad hag hor mamm ?*

Abalamour m'o deus roet d'comp ar vuhez ha ma tale'hont en hor e'bichen plas an Aotrou Doue.

3. *Pere eo hon deveriou e-keñver hor mistri ?*

Ni a dle o respeti ha senti outo.

4. *Pere eo deveriou ar gerent e-keñver o bugale ?*

Ar gerent a dle lakaat badezi o bugale kenta ma e'hellont, rei d'ezo deskadurez ha kelenadurez kristen, diarbenn o zechou fall, ha rei skouer vat d'ezo.

5. *Pere eo hon deveriou e-keñver hor bro ?*

Ni a dle karout hor bro, douja d'an dud e karg ha plega d'al lezennou, pa vezont just.

6. *Pere eo hon deveriou e-keñver an holl dud ?*

Ni a dle karout an holl dud, diwall d'ober gaou outo, ha poania da zerc'hel ar peoc'h etrezo.

Da lenn :

Jezuz, hag heñ mab da Zoue, a zo bet atao sentus ouz e dad mager hag ouz e vamin.

Jezuz, hag heñ Doue, a zo bet atao doujus da c'houarnamant e vro :

« Rentit da Sezar ar pezh a zo da Sezar, ha da Zoue ar pezh a zo da Zoue ».

Jezuz, hag heñ Salver ar bed, a zo bet leun a garantez evit e vro, betek skuilh daelou warni :

« Jeruzalem, Jeruzalem, te hag a laz ar brofeted..., pet gwech n'em eus ket klasket boda da vugale, evel ma vod ar yar he yer bihan dindan he diouaskell, ha n'eo ket falvezet ganit ».

(Hervez Sant Lukaz XIII).

Da ober : Me a sento ouz va zud hag ouz kement den en deus da welout warnoun.



Eur pec'hed spontus a ra Kain o laza e vreur Abel.
Gwasoc'h eo c'hoaz torfed an den a laka e nesa, dre ar skouer fall,
da goueza er pec'hed marvel.

(18^{vet}) TRIOUEC'HVET KENTEL

*Ha mir na lazi den ebet
Nag a galon nag a efed.*

1. *Petra a zifenn ouzomp pempvet gourc'hemenn Doue ?*

Pempvet gourc'hemenn Doue a zifenn ouzomp kement tra a c'hell ober droug d'ar c'horf hag er re-all.

2. *Penaos e vez graet droug da gorf an nesa ?*

O skei pe o laza hep gwir ebet.

3. *Ha gwir a vez a-wechou da laza ?*

Ya, gwir a zo da laza :

an dorfetourien vras a vez bet barnet d'ar maro, an enebourien war an dachenn-vrezel, ha kement den fall o klask rei d'eomp taol ar maro, pa ne vez doare all ebet d'en em zifenn.

4. *Penaos e vez graet droug da ene an nesa ?*

O tougen anezañ d'ar pec'hed dre gomz, dre skrid pe dre ober; hennez eo ar pec'hed a skouer iall.

5. *Ha pec'hed bras eo rei skouer fall ?*

Ya, pa vez en eur wall-dra. Respont a rannimp eus ar pec'hejou hor bezo lakaet ober, koulz hag eus ar pec'hejou hor bezo graet hon-unan.

6. *Ha pec'hed bras eo en em laza ?*

Ya, pec'hed bras eo : hor buhez a zo da Zoue, hag en em zistruja evit mirout kaout poan a zo beza digalon.

Da lenn. — Jezuz en deus lavaret : « N'ho pet ket aon rak an dud a laz ar c'horf. Diwallit kentoc'h rak an dud a c'hell koll an ene hag e stlepel en Ifern ».

(St Vaze X).

« Malloz, emezañ c'hoaz, d'an den a zoug da bec'hi unan eus ar vugaligou-se hag a gred ennoun.

Gwelloc'h e vefe d'ezañ e vije staget d'ezañ eur maen-milin ouz e c'houzoug ha taolet war e benn er mör ».


(St Vaze XVIII).




Da ober : Me a roio atao skouer vat.



Eur peched bras eo bet d'ar Juzevien adori eul leue aour.
Ne die beza adoret nemet an Aotrou Doue.



David ha Goliad. — Evel an den yaouank David, ni a die
difenn hor mamm-vro... e riskl hor buhez zoken.



Ar Galon-Sakr en em ziskouez d'al leanez santel Marc'ha-
rid-Mari : « Setu, emezañ, ar galon he deus karet kement an dud
hag a zo karet ken nebeut ganto ».



Sant Judikael, roue Breiz, a samm eun den lor war e gein da
dreuzi eur stêr... Treuzet ar stêr, an den lor a zeuas kerkent da veza
kaer ha skedus-kenañ... Hor Salver e-unan eo en doa douget an Sant
dindan furm eur c'hlañvour... Bezomp atao mat ouz ar re baour
hag ouz ar re glañv.



Skuiz gant pec'hejou hudur an dud, Doue a laka da zont warno an dour-beuz.

(19^{vet}) NAONTEKVET KENTEL

*D'ar pec'hed vil n'en em ro ket
Dindan boan da veza daonet.
Na c'hoanta dre luksur pec'hi
Nag e sonj vil n'en em bliji.*

1. *Petra a zifenn ouzomp c'houec'hvet ha navet gourc'hemenn Doue ?*

C'houec'hvet ha navet goure'hemenn Doue a zifenn ouzomp plijadurioù vil ar c'horf, ar c'hoant pe ar sonj anezo, ha kement tra a zoug d'ezo: sellou, komzou pe oberou divalo.

2. *Ar c'hoant hag ar sonj, ha pec'hed int atao ?*

Nann, ar c'hoant hag ar sonj n'int pec'hed nemet pa ro ar volontez hec'h asant d'ezo.

3. *Perak eo pec'hed ar plijadurioù vil ?*

Abalamour ma 'z int eun dizurz, ma vreinont an den korf hag ene ha ma tiskaront ar familhou hag ar broioù.

4. *Ar gristenien dreist-holl, ha karout a dleont ar c'hlanded ?*

Ya, dre ma 'z int izili da Jezuz-Krist ha templou d'ar Spered-Santel.

5. *Petra a zo d'ober evit chom glan ?*

Beza mat da bedi, mont alies da gomunia ha beza devot d'ar Werc'hez Vari.

6. *Petra a zo d'ober c'hoaz ?*

Ret eo c'hoaz beza war evez ha tec'hout diouz kement tra a zoug d'ar pec'hed vil.

7. *Pere eo an traou a zoug ar muia d'ar pec'hed vil ?*

An traou a zoug ar muia d'ar pec'hed vil eo al leziregez, ar vezventi, an darempredou danjerus, ar marvailhou louz, al levrioù hudur, ar c'hoarioù hag ar sinemaioù iall, ar gwiskamanchou hag an dañsou divodest.

Da lenn. — An abostol Sant Paol a skrive gwechall da gristenien Efez :

« Arabat e c'hellfed tamall d'eoc'h hini ebet eus ar pec'hejou vil ; an hudurnez ne zere ket ouz sent (tud badezet). Klevit ganin : den ebet, a gement en em ro d'ar pec'hed vil, ne vezo degemeret e rouantelezh Doue. »

(Efez. V.).

Da gristenien Korint e skrive kement-mañ :

« Daoust ha ne ouzoc'h ket eo ho korf templ ar Spered-Santel, a zo ennoc'h o chom, ha n'oc'h mui mestr d'eoc'h hoc'h-unan ? Prenet oc'h bet (gant Jezuz) ha koustet oc'h ker d'ezañ. »

Da ober : Me a lavaro bemdez eun « Ave Maria » da c'houlenn gras ar c'hlanded.



Jezuz hag ar publikan Zache.

(20^{vet}) UGENTVET KENTEL

*Laerez na miret madou den
Gant gouzিয়েgez ne ri biken.
Madou re-all na c'hoanta ket
Evit o c'haout hep gwir ebet.*

1. *Petra a zifenn ouzomp seizvet ha dekvet gourc'hemenn Doue ?*

Seizvet ha dekvet gourc'hemenn Doue a zifenn ouzomp ober gaou ouz an nesa en e vadou, ha zoken kaout c'hoant d'hen ober.

2. *An hini en deus graet gaou ouz an nesa en e vadou, petra a dle ober ?*

Ret eo d'ezañ restaol ar pezh en deus laeret ha digoll an droug en deus graet.

3. *Da biou e tleer restaol ?*

D'an hini a vez bet graet gaou outañ pe d'e eritourien.

*Na gevier na fals-testeni
Mir birviken na lavari.*

4. *Petra a zifenn ouzomp eizvet gourc'hemenn Doue ?*

Eizvet gourc'hemenn Doue a zifenn ouzomp :

- 1a) Da genta : **dougen testeni faos dirak ar barnier ;**
- 2) D'an eil : **lavarout gevier ;**
- 3e) D'an trede : **noazout da vrud vat an nesa.**

5. *Petra eo lavarout gevier ?*

Lavarout gevier a zo lavarout ar c'hontrol eus ar pezh a sonjer, evit trompla ar re-all.

6. *Perak ne c'heller ket lavarout gevier ?*

Abalamour m'en deus Doue roet d'eomp an teod evit diskleria ar wirionez ha m'eo ret e c'hellfemp kaout fiziañs an eil en egile.

7. *Petra a zo noazus da vrud vat an nesa ?*

Drouk-sonjal, tamall e gaou ha drouk-prezeg.

Da lenn :

An den santel Tobiaz, a gomz anezañ an Testamant koz, a oa eun den onest-meurbet. Deuet da veza dall, paour-raz, reuzeudik, ne c'houzanve ket an distera laeroñsi.

Eur wech, e wreg, echu he devez labour, a zeuas ganti d'ar gêr eur c'havrig, a oa bet roet d'ezhi e gopr : « Diwall, eme Dobiaz, na vije bet laeret ar c'havrig-se ganit ! Ma 'z eo eur c'havrig laeret, kas anezi d'he ferc'henn dioustu. Rak ne c'hellomp ket debri eun dra laeret, na zoken touch outañ ».

(Tobiaz II).

Da ober : Atao, kousto pe gousto, me a lavaro ar wirionez.



Va iliz-parrez

(21a) KENTA KENTEL WAR 'N UGENT

*I. — Ouspenn ar sul, a-hed ar bloaz,
Pevar gouel-berz a viri c'hoaz.*

1. Petra a ordren d'eomp kenta gourc'hemenn an Iliz ?

Kenta gourc'hemenn an Iliz a ordren d'eomp santelaat ar goueliou-berz evel ar sul.

2. Pet gouel-berz a zo e Frañs ?

E Frañs ez eus pevar gouel-berz :

Gouel Nedeleg, ar Yaou-Bask, gouel Maria-Hanter-Eost ha gouel an Holl-Sent.

*II. — Klevout a ri mat penn-da-benn
Sul ha gouel - berz an oferenn.*

3. Petra a ordren d'eomp eil gourc'hemenn an Iliz ?

Eil gourc'hemenn an Iliz a ordren d'eomp klévout an oferenn da sul ha d'ar goueliou-berz.

4. Ha pec'hed bras eo mankout d'an oferenn da sul ha d'ar goueliou-berz, dre ar faot ?

Ya, pec'hed bras eo, rak mont d'an oferenn a zo unan eus brasa deveriou ar c'hristen.

*III. — Eur wech ar bloaz, da vihana,
E kofesañ hep nac'h netra.*

5. Petra a ordren d'eomp trede gourc'hemenn an Iliz ?

Trede gourc'hemenn an Iliz a ordren d'eomp kofes hor pec'hejou da vihana eur wech ar bloaz.

6. Perak e lavarit : « Da vihana eur wech ar bloaz » ?

Abalamour ar re o deus c'hoant e gwirionez d'ober o silvidigez, a ya da gofes aliesoc'h.

7. Da be oad e tleer kas ar vugale da gofes ?

Pa vezont deuet da gaout skiant.

Da lenn. — Gwechall, dindan lezenn an Testamant koz, ar sadorn, anvet ar sabad gant ar Juzevien, a oa an devez santel.

« Bez sonj da santelaat ar sabad, a lavaras Doue da Voizez. En devez-se, ne ri taol-labour ebet, na te, na da vab, na da verc'h, na da vevel, na da vatez, na da loened, nag an den diavaez a c'hellfe beza ganit en da di. Rak c'houec'h devez en deus lakaet Doue da groui an neñv, an douar, ar mor, ha kement a zo enno ; d'ar seizvet devez en deus chanet. Setu perak en deus Doue benniget an devez sabad hag e santelaet ».

(Ekzod XX, 8-11).

An Iliz, hag emañ ganti galloud Doue, he deus graet eus ar sul an devez santel e lec'h ar sadorn, abalamour m'eo d'ar sul e resusitas Hor Salver hag e tiskennas ar Spered-Santel war an ebestel.

Da ober : Me a roio da Zoue ar sul hag ar goueliou-berz penn-da-benn.



An Oan Pask a oa eur skeudenn eus Jezuz, Oan Doue,
en em ro d'an dud e Sakramant an Aoter.

(22¹) EIL KENTEL WAR 'N UGENT

IV. — *Ha da Salver a resevi
Da Bask, devota ma c'helli.*

1. *Petra a ordren d'eomp pebare gourc'hemenn an
Iliz ?*

**Pebare gourc'hemenn an Iliz a ordren d'an
holl dud fidel en oad a skiant komunia da
vihana eur wech ar bloaz, da Bask.**

2. *Ha pec'hed bras eo mankout ar pask ?*

**Ya, pec'hed bras eo. Mankout ar pask a zo
disenti en eur poent grevus ouz Hor Salver
Jezuz-Krist hag ouz an Iliz.**

V. — *Yun a ri an daouzek deizio
Ar c'horaiz hag ar vijilou.*

3. *Petra a ordren d'eomp pempvet gourc'hemenn an
Iliz ?*

**Pempvet gourc'hemenn an Iliz a ordren d'eomp
yun e-pad ar c'horaiz, d'an daouzek deizio,
ha dere'hent lod eus ar gouelioù bras.**

4. *Piou eo an dud a zo dleet d'ezo yun ?*

**Ar re o deus eur bloaz war 'n ugent echu
ha n'o deus ket c'hoaz tri-ugent vloaz, nemet
ar c'hleñved pe al labourioù tenn a virie outo.**

VI. — *Da zeiz vijil na da wener
Ne zebri kig e nep amzer.*

5. *Petra a zifenn ouzomp c'houec'hvet gourc'hemenn
an Iliz ?*

**C'houec'hvet gourc'hemenn an Iliz a zifenn
ouzomp debri kig d'ar gwener ha d'an devezioù
difennet, hep ezomm hag hep dispans.**

6. *Ha ret eo d'eomp heulia gourc'hemennou an Iliz ?*

**Ya, rak disenti ouz an Iliz a zo disenti ouz
Jezuz-Krist e-unan.**

*Da lenn. — Jezuz en deus lavaret d'e ebestel — ha drezo d'an
Iliz — : «Ganeoc'h emañ betek fin ar bed... An neb ho selaou, am
selaou; an neb ho tispriz, am tispriz me va-unan».*


*Dre he c'houec'h gourc'hemenn, an Iliz ne ra nemet diskouez
d'eomp an doare gwella da senti ouz Jezuz.*

*Jezuz en deus savet sakrifis an oferenn. An Iliz a lavar d'eomp eo
d'ar sul ha d'ar gouelioù-berz e tleomp klevout an oferenn.*

*Jezuz en deus savet Sakramant an Aoter. An Iliz a lavar d'eomp
e rankomp komunia da bask dindan boan a bec'hed ha lakaat hon
ene e stad d'hen ober dre eur gofesion vat.*

*Jezuz en deus ordrenet ober pinienn : «Ma ne rit ket pinienn, ez
eoc'h holl da goll». An Iliz a verk d'eomp an devezioù da ober pinienn.
Da wener eo e fell d'ez e rafemp vijil, rak da wener ar groaz eo maro
Jezuz-Krist evidomp.*

**Da ober : Me a raio vijil d'ar gwener ha d'an
devezioù merket gant an Iliz.**



Feiz kreñv an ofiser : « Mestr, lavarit eur gomz hepken, ha va servijer a vezo pare ». — « It, eme Jezuz, ra vezo graet hervez ho feiz ». War an taol en em gavas ar servijer pare.

(23^e) TREDE KENTEL WAR 'N UGENT

1. Petra eo eur vertuz ?

Eur vertuz a zo eur pleg mat en eun den.

2. Pere eo ar vertuziou teologal ?

Ar vertuziou teologal eo ar feiz, an esperañs, hag ar garantez.

3. Petra eo ar feiz ?

Ar feiz a zo eur vertuz dreist-natur hag a ra d'eomp kredi start holl gwirioneziou ar relijion gristen.

✠ 4. Grit eun akt a feiz.

Va Doue, me a gred start kement tra hoc'h eus diskleriet hag a ordren d'in an Iliz kredi, abalamour ma 'z oc'h ar wirionez ha n'hellit na fazia nag hon lakaat da fazia.

5. Petra eo an esperañs ?

An esperañs a zo eur vertuz dreist-natur hag a ra d'eomp gortoz digant Doue, gant eur fiziañs divrall, e c'hrasou er bed-mañ hag ar Baradoz er bed all.

6. War betra eo harpet hon esperañs ?

War galloud ha madelez Doue;
war bromesaou ha meritou Jezuz-Krist.

✠ 7. Grit eun akt a esperañs.

Va Doue, me a esper digant ho madelez, ha dre veritou Jezuz-Krist va Salver, ho krasou er bed-mañ hag ar Baradoz er bed all, abalamour m'hoc'h eus lavaret o rojec'h d'in ha ma tale'hit atao d'ho ker.

Da lenn. — Da wener ar groaz, war ar Menez Kalvar, a bep tu da Jezuz, e oa ivez daou laer o vervel war bep a groaz. Unan anezo, an hini kleiz, a gomze divalo da Jezuz :

« Ma 'z out ar C'hrist, en em denn diwar da groaz, hag hor savete, ni ivez ».

Al laer dehou a c'hourdrouzas al laer kleiz : « Ni da vihana, n'hon eus netra da lavarout, pegwir hon torfejou eo hor stag ouz ar groaz. E-lec'h hemañ n'en deus graet droug ebet ».


Hag e lavaras da Jezuz : « Aotrou, ho pet sonj ac'hanoun, pa vezoc'h degouezet en ho rouantelez ».

Jezuz a respontas d'ezañ : « E gwirionez, m'hel lavar d'it, hirio e vezi ganin er baradoz ».

(Hervez St Lukaz .XXIII).

Eul laer eo a glevas ar gomz kaer-se... Eul laer hag en doa feiz, pegwir ec'h anavezaz Jezuz evit mab da Zoue, d'ar poent ma varve war eur groaz... Eul laer hag en doa esperañs ivez. E-kreiz e boaniou e taolas e sellou war groaz Jezuz. E-lec'h fallgaloni, e pedas gant fiziañs. Pardonet e voe ha d'ar Baradoz e pignas.

Da ober : Er boan, me a daolo war groaz Jezuz eur sell a feiz hag a fiziañs.



Ar Samaritan, ha n'eo nemet eun diavaeziad, a gemer truez ouz ar paour-kaez den gloazet hag a ro d'ezañ sikour.

(24^{vet}) PEDERVET KENTEL WAR 'N UGENT

1. *Pehini eo ar vrasa eus an holl vertuziou ?*

Ar vrasa eus an holl vertuziou eo ar garantez.

2. *Petra eo ar garantez ?*

Ar garantez a zo eur vertuz dreist-natur hag a ra d'eomp karout Doue dreist pep tra hag hon nesa eveldomp hon-unan, abalamour da Zoue.

3. *Petra eo karout Doue dreist pep tra ?*

Karout Doue dreist pep tra a zo e garout muioc'h eget hor madou, hor c'herent, hag hor buhez zoken.

4. *Piou eo hon nesa ?*

Hon nesa eo kement den a zo.

5. *Petra eo karout hon nesa eveldomp hon-unan ?*

Karout hon nesa eveldomp hon-unan a zo c'hoantaat hag ober d'ezañ an holl vad a garfemp a vefe graet d'eomp hon-unan.

6. *Penaos e tiskouezomp hor c'harantez e-keñver hon nesa ?*

Dre an oberou a drugarez a ra vad d'e gori pe d'e ene, ha dreist-holl dre an aluzen.

✠ 7. *Grit eun akt a garantez.*

Va Doue, me ho kar a-greiz va c'halon, ha dreist kement tra a zo, abalamour ma 'z oc'h peurvut ha din meurbet da veza karet, ha me a gar ivez va nesa eveldoun va-unan abalamour d'eoc'h.

Da lenn. — D'ar Yaou-Gambrid, goude ar goan ziweza, Jezuz a lavaras d'e ebestel' :


« Va bugaligou, n'em eus mui hir amzer da chom ganeoc'h. A-raok kimiada diouzoc'h, e roan d'eoc'h eur gourc'hemenn nevez : en em garit en eil egile, evel m'am eus ho karet.

...Dre ar garantez a ziskouezoc'h an eil evit egile, e vezoc'h anavezet evit va diskibien... Ar pezh a c'houlennan diganeoc'h, eo en em garout an eil egile ».

(Hervez *St Yann XIII ha XV*).

An abostol Sant Yann e-unan a skrive diwezatoc'h ar gomz-mañ :
« An neb a lavar en deus karantez evit Doue ha na gar ket e nesa, a zo eur gaouiad ».

Da ober : Me a raio d'ar re-all ar pezh a garfen e vefe graet d'in va-unan.



Gwasa tra a zo eo ar pec'hed. Ar pec'hed eo en deus staget Jezuz-Krist ouz ar groaz.

(25^{vet}) PEMPVET KENTEL WAR 'N UGENT

✠ 1. *Petra eo ar pec'hed ?*

Ar pec'hed a zo eun disentidigez ouz lezenn Doue.

2. *Peur e vez graet eur pec'hed ?*

Pa vez graet eun dra fall, o c'houzout ervat eo difennet.

3. *Hag an dentasion a zo eur pec'hed ?*

Nann, an dentasion n'eo eur pec'hed nemet asanti a rafemp d'ezi.

4. *Pet seurt pec'hejou a zo ?*

Daou seurt pec'hejou a zo : ar pec'hed marvel hag ar pec'hed veniel.

5. *Penaos e vez graet ar pec'hed marvel ?*

Ar pec'hed marvel a vez graet o tiseni ouz lezenn Doue en eur wall-dra gant anaoudegez ha bolontez leun.

6. *Petra a zeu da heul ar pec'hed marvel ?*

Ar pec'hed marvel a ro ar maro da c'hras Doue en ene hag hon laka war hent an ifern.

7. *Penaos e vez graet eur pec'hed veniel ?*

E diou feson : da genta, o terri lezenn Doue en eur poent dister; d'an eil, o terri lezenn Doue en eur poent grevus, met hep gouzout mat petra a reer pe hep rei an holl asant d'ar pec'hed.

8. *Petra a zeu da heul ar pec'hed veniel ?*


Ar pec'hed veniel a laka karantez Doue da semplaat ennomp, a zigor hent d'ar pec'hed marvel hag a ra d'eomp meritout poaniou ha ne badint ket atao.

9. *Petra a ranker ober, pa vez bet graet eur pec'hed marvel ?*

Ret eo ober eun akt a gontrision, mont da gofes, ha poania da chom dibec'h goude.

Da lenn :

Al lorgnez 'a zo eur c'hleñved skrijus. Lorgnez an ene, ar pec'hed, a zo kalz skrijusoc'h c'hoaz.



Da ober : Me a dec'ho diouz ar pec'hed evel ma tec'hfen diouz eun naer.



E-pad ma kousk ar wazed, e teu an enebour da hada draog e-touez an ed... An enebour eo an diaoul; an draog, ar sonjou fall... Bezomp war evez, diwallomp mat ouz an diaoul!

Ar farizian lore'hek ne blij ket e bedenn da Zoue evel ma ra pedenn ar publikan, a zo izel a galon. Bezomp atao izel a galon. Brezel d'al lore'hentez!

(26^{vet}) C'HOUEC'HVET KENTEL WAR 'N UGENT

1. *Petra eo ar pec'hejou kapital ?*

Ar re a zo evel mammenn an holl bec'hejou all.

2. *Pet pec'hed kapital a zo ?*

Seiz pec'hed kapital a zo : ar lore'hentez, ar bizoni, an hudurnez, an avi, al lontegez, ar vuanegez hag an diegi. (1)

3. *Petra eo al lore'hentez ?*

Al lore'hentez a zo eur garantez direiz en deus an den evitañ e-unan hag a ra d'ezañ en em gavout dreist ar re-all ha klask en em sevel uheloc'h egeto.

(1) Er c'hatekiz koz : an ourgouilh, an avaristed, al luksur, an avi, ar gourmandiz, ar goler, an diegi.

4. *Petra eo ar bizoni ?*

Ar bizoni a zo eur garantez direiz evit madou ar bed, ha dreist-holl evit an arc'hant.

5. *Petra eo an hudurnez ?*

An hudurnez a zo eur garantez direiz evit plijadurioù vil ar c'horri.

6. *Petra eo an avi ?*

An avi a zo eun tech fall hag a ra d'eomp kaout displijadur, pa erru vad gant hon nesa, ha plijadur, pa erru droug gantañ.

7. *Petra eo al lontegez ?*

Al lontegez a zo eur garantez direiz evit an debri hag an eva.

8. *Petra eo ar vuanegez ?*

Ar vuanegez a zo eun tech fall hag a ra d'eomp mont e kounnar hep digarez.

9. *Petra eo an diegi ?*

An diegi a zo eun tech fall hag a ra d'eomp lezel hon dever gant aon d'en em ziaeza.

Da lenn : Ar vezventi eo ar gwasas eus ar pec'hejou a lontegez. Eva betek koll ar skiant vat hag ar yec'hed a ziskar ar mezquier izeloc'h eget al loen mut.

Da ober : Me a labouro mat er skol.



Ar marc'hadour perlez a werz e vadou all evit prena eur berlezenn dispar.

N'eus perlezenn ebet hag a vefe ken kaer hag ar stad a c'hras.

(27^{vet}) SEIZVET KENTEL WAR 'N UGENT

1. *Ha ni a c'hell, dre hon nerz hon-unan, mirout gourc'hemenou Doue ha re an Iliz, ha mont d'ar Baradoz ?*

Nann, ezomm hon eus evit kement-se eus gras an Aotrou Doue.

2. *Petra eo ar c'hras ?*

Ar c'hras a zo eur donezon dreist-natur a ro Doue d'eomp dre vadelez hepken.

3. *Pei seurt grasou a zo ?*

Daou seurt grasou a zo :
ar c'hras-santelaat hag ar c'hras-sikour.

4. *E pe stad e vez an ene gant ar c'hras-santelaat ?*

Er stad a c'hras.

5. *Petra eo ar c'hras-santelaat ?*

Ar c'hras-santelaat eo buhez Doue ennomp, a ra d'hon oberou beza dreist-natur ha talvoudus evit ar Baradoz.

6. *Petra a zeuomp da veza gant ar c'hras-santelaat ?*

Gant ar c'hras-santelaat e teuomp da veza templou d'ar Spered-Santel, bugale da Zoue, ha eritourien eus ar Baradoz.

7. *Pere eo an oberou a dalv evit ar Baradoz ?*

An oberou a reomp er stad a c'hras hag evit plijout da Zoue.

8. *Penaos e koller ar stad a c'hras ?*

Dre ar pec'hed marvel.

9. *Ha kavout a c'hellomp adarre ar c'hras-santelaat, p'hon devez he c'holllet ?*

Ya, he c'havout a c'hellomp adarre dre eun akt a gontrision barfet pe dre sakramant ar binijenn.

Da lenn. — Ar c'hras-santelaat eo Doue e-unan o chom ennomp. « Eun ene er stad a c'hras, eme sant Aogustin, a zo eur baradoz ».

Hag, e gwirionez, selaout petra a lavar Jezuz : « An neb am c'haro, a heulio va c'hoimzou ; va Zad en devezo karantez evitañ, ha ni a ziskenno ennañ da chom ».

(Aviel St Yann XIV).

Da ober : Me a soñjo alies emañ Doue o chom em c'halon.



Gras Doue a c'hounez kalon Saul, hag e lavar :
« Aotrou, petra a fell d'eoc'h a rafen » ?

Enebour ar gristenien a zeu da veza an abostol bras Sant Paol.

(28^{vet}) EIZVET KENTEL WAR 'N UGENT

1. *Petra eo ar c'hras-sikour ?*

Ar c'hras-sikour a zo eur sklerijenn pe eur skoazell a ro Doue d'eomp d'ober ar mad ha d'en em zivall diouz an droug.

2. *Ha Doue a ro ar c'hras-se d'an holl dud ?*

Ya, Doue a ro ar c'hras-se d'an holl dud, ha zoken d'ar vrasa pec'herien ; an dud a ya da goll, en em goll dre o faot.

3. *Hag enebi a c'hellomp ouz gras Doue ?*

Ya, hag hen ober a reomp re alies.

4. *Petra en em gav gant ar re a zo boaz da enebi ouz gras Doue ?*

E riskl emaint da galedi er pec'hed ha da goll o ene.

5. *Penaos e leu d'comp peurvuia ar c'hras-santelaat hag ar c'hras-sikour ?*

Dont a reont peurvuia dre ar bedenn hag ar sakramanchou.

Da lenn. — Jezuz, eun deiz, a bignas en eur vag evit treuzi lenn Jenezared gant e ziskibien. Ha setu ar mor o tirolla hag an tarziou o lammat dreisto. Jezuz a oa en em roet da gousket.

E ziskibien a dostaas outañ d'hen dihuna :

« Mestr, emezo, deuit d'hor sikour, emamp o vont da goll ».

Jezuz a lavaras d'ezo :

« Perak e spontit evel-se, tud a feiz laosk » ?

Neuze e savas ; gourc'hemenn a reas d'an avel ha d'ar mor, ha, war an taol, ar barr-amzer a dorras.

(*St Vaze VIII 23-26*).

Ar vuhez a zo ivez eur mor dirollet. Ma vefemp hon-unan, en em gollfemp. Doue n'hon dilez ket. Evel an ebistel, galvomp anezañ d'hor sikour. Gant e c'hras en em dennimp eus pep danjer.

Da ober : Pa vezo an droukspered o klask va dougen da bec'hi, me a lavaro da Jezuz :
« Mestr, deuit d'am sikour, emoun o vont da goll ».



Ar rogasionou eo ar pedennou hag ar prosesionou a ra an Iliz en tri devez a-raok ar Yaou-Bask evit tenna bennoz an Aotrou Doue war an drevajou hag an eostou.

(29^{vet}) NAVET KENTEL WAR 'N UGENT

✠ 1. *Petra eo pedi ?*

Pedi a zo sevel hor spered hag hor c'halon war-du Doue evit e adori, e drugarekaat ha goulenn digantañ e c'hrasou hag ar pardon eus hor pec'hejou.

2. *Peur e lleomp-ni pedi ?*

An alies a gwella, mintin ha noz d'an nebeuta.

3. *Evit piou e lleomp pedi ?*

Pedi a dleomp evidomp hon-unan hag an Iliz, evit hor c'herent ha mignoned, evit ar re veo hag ar re varo.

4. *Penaos e lleomp pedi ?*

Pedi a dleomp gant evez hag izelded, gant fiziañs hag hep fallgaloni.

5. *Ha selaou a ra Doue hor pedennou atao ?*

Ya, pa vezont graet mat, nemet e ro ar pezh a zo ar gwella evit an ene.

6. *Ha goulenn a c'hellomp ivez madou ar bed ?*

Ya ; Doue avat n'o ro d'eomp nemet hor sikour a c'hellfent d'en em savetei.

Da lenn :

Ar bedenn eo nerzusa tra a zo. pegvir Doue e-unan a falvez gantañ beza trec'het ganti.

« Goulennit hag e resevot ; klaskit hag e kavot ; skoit war an nor hag e vezo digoret d'eoc'h » !

Jezuz eo en deus graet d'eomp ar broma-se.

Pedomp eta gant fiziañs.



Da ober : Me a lavaro bemdez va fedennou, mintin ha noz.



Jezuz a zesk d'e zi-skibien pedi. - Pa bedoc'h, lavarit evel-hen : Hon Tad hag a zo en Neñv ».

(30^{et}) TREGONTVET KENTEL

1. Pehini eo ar wella eus ar pedennou ?

Ar wella eus ar pedennou eo ar « Bater », pe « Hon Tad hag a zo en Neñv » anvet c'hoaz « pedenn Hor Salver », abalamour m'eo bet desket d'eomp gant Jezuz.

✠ 2. Lavarit pedenn Hor Salver, pe « Hon Tad hag a zo Neñv... ».

Hon Tad hag a zo en Neñv... (p. 106).

3. Pet goulenn a zo er Bater ?

Ar Bater a zo seiz gouleñn enni. An tri genta a sell ouz Doue. Ar pevar all a sell ouzomp hag ouz hon nesa.

4. Pehini eo ar bedenn wella goude ar Bater ?

Ar bedenn wella goude ar Bater eo an « Ave Maria », pe « Me ho salud, Mari », anvet c'hoaz « Salud an Ael ».

✠ 5. Lavarit : salud an ael, pe « Me ho salud, Mari ».

Me ho salud, Mari... (p. 106).

6. Perak e lavaromp d'ar Werc'hez : pedit evidomp, pec'herien, bremañ ha da eur hor maro ?

Abalamour ma 'z omp holl pec'herien ha m'hon eus ezomm, dreist-holl da eur hor maro, eus he skoazell a Vamm.

Da lenn :

Pep kristen a dle gouzout lavarout ar chapeled. Setu amañ penaos e vez graet :

« En ano an Tad... » ha « Me a gred e Doue... », war ar groaz.

« Hon Tad hag a zo en Neñv » war ar c'hreunenn genta.

« Me ho salud, Mari » war an teir all.


« Gloria Patri » hag « Hon Tad hag a zo en Neñv », war ar bempvet greunenn.

Goude ez eer a bep eil gant ar pemp dizenez en eur lavarout « Me ho salud, Mari » war bep greunenn vihan, Gloria Patri » hag « Hon Tad hag a zo en Neñv » war bep greunenn vras.

E Lourd, pa gemere ar plac'hig Bernaded he chapeled, e vousec'hoarze ar Werc'hez Vari outi gant karantez hag e lakae ivez greunennou he chapeled hec'h-unan da rikla etre he bizied.

Diskouez a rae evel-se pegement e plij d'ezi ar chapeled.

Da ober : Bep sul, me a yelo d'an iliz evit ar chapeled pe ar rozera.



Ar Sakramanchou a zo evel korzennou hag a zegas betek hon ene gwad H. S. Jezuz-Krist.

(31^a) KENTA KENTEL HA TREGONT

1. *Petra eo eur sakramant ?*

Eur sakramant a zo eur sin sakr savet gant Hor Salver Jezuz-Krist evit lakaat pe greski ar c'hras en eneou.

2. *Pet sakramant a zo ?*

Seiz sakramant a zo :
ar Vadeziant, ar Gouarnasion, Sakramant an Aoter, ar Binienn, an Nouenn, an Urz hag ar Briedelez.

3. *Ar re a reseo eur sakramant, ha reseo a reont atao ar c'hras ?*

Ya, gant ma resevint ar sakramant evel m'eo dleet.

4. *Ha pec'hed eo reseo eur sakramant hep beza er stad d'hen ober ?*

Ya, eur pec'hed eo, ha zoken eur sakrilaj.

5. *Ha sakramanchou a zo ha n'heller o reseo nemet eur wech ?*

Ya, n'heller reseo nemet eur wech ar Vadeziant, ar Gouarnasion hag an Urz.

6. *Perak n'heller reseo an tri sakramant-se nemet eur wech ?*

Abalamour, eur wech gouestlet drezo da Zoue, ez eo evit atao.

Da lenn :

« Deuet oun, eme Hor Salver, evit m'o devezo ar Vuhez enno ». Dre ar sakramanchou eo e red buhez Doue en hon eneou.

Ar Vadeziant a ro buhez ar c'hras.

Ar Gouarnasion a greñva buhez ar c'hras.

Sakramant an Aoter a vag buhez ar c'hras.

Ar Binienn a bare pe a restaol buhez ar c'hras.

An Nouenn a sikour mervel gant buhez ar c'hras.

An Urz a ra beleien da skignna buhez ar c'hras.

Ar Briedelez a ro bugale hag a resevo buhez ar c'hras.

Da ober : Me a dostaio alies, hag atao gant feiz, ouz ar sakramanchou.



Ar beleg o vadezi eur bugel.

(32^d) EIL KENTEL HA TREGONT

1. *Petra eo ar Vadeziant ?*

Ar Vadeziant a zo eur sakramant hag a ro d'comp ar c'hras-santelaat, a nêta hon ene diouz ar pec'hed orijinel hag hor gra kristenien ha bugale da Zoué ha d'an Iliz.

2. *Ha ret eo beza badezet evit mont d'ar Baradoz ?*

Ya; ar vugale n'int ket bet badezet, n'hellont ket mont d'ar Baradoz.

3. *Piou a c'hell badezi ?*

N'eus forz piou a c'hell badezi, pa vez ret. A-hend-all e tle ar Vadeziant beza roet gant eur beleg.

4. *Petra a ranker ober evit rei mat ar Vadeziant ?*

Evit rei mat ar Vadeziant, e ranker skuilh dour naturel war benn an hini a vadezer; hag an hini a skuilh an dour, a dle lavarout er memes amzer : « me ho padez en ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered-Santel ».

5. *Petra eo ar Gonfirmasion ?*

Ar Gonfirmasion a zo eur sakramant hag a ro d'eomp ar Spered-Santel gant e seiz donezon evit ober ac'hanomp kristenien barfet ha soudarded da Jezuz-Krist.

6. *E pe stad eo rei beza evit reseo ar Gonfirmasion ?*

Ret eo beza er stad a c'hras ha gouzout mat ar c'hatekiz.

7. *Piou en deus ar galloud da rei ar Gonfirmasion ?*

An Aotrou 'n Eskob.

Da lenn. — Lidou ar Gonfirmasion. — An Aotrou 'n Eskob a enton ar ganaouenn d'ar Spered-Santel anvet ar « Veni Creator ».

Goude :

1° An Aotrou 'n Eskob a bign ouz an aoter. En e sav, troet war-du ar re a dle reseo ar sakramant, ec'h astenn e zaouarn warno, hag e ped Doue da rei d'ezo seiz donezon ar Spered-Santel.

2° Ar re a dle beza konfirmet, a dosta ouz an Aotrou 'n Eskob hag a zaoulin dirazañ.

E zorn astennet war benn pep-hini, a bep eil, an Aotrou 'n Eskob a ra sin ar groaz war o zal gant an oleo-sakr en eur lavarout : « Me a verk ennout sin ar groaz ✠ hag a ro d'it ar Gonfirmasion gant oleo-sakr ar silvidigez, en ano an Tad ✠ hag ar Mab ✠ hag ar Spered ✠ Santel.

3° Hag en eur rei da bep-hini eur fasadig, e lavar : « Ar peoc'h ra vezo ganit ».

Da ober : Da seiz va Badeziant, bep bloaz, me a yelo d'an oferenn ha da gomunia.



D'ar Yaou-Gambrlid, d'erc'hent e varo, er goan ziweza a reas gant e ebstest, Jezuz a savas Sakramant an Aoter meulet ra vezo.

(33^e) TREDE KENTEL HA TREGONT

1. Pehini eo ar brasa eus ar sakramanchou ?

Ar brasa eus ar sakramanchou eo Sakramant an Aoter.

✠ 2. Petra eo Sakramant an Aoter ?

Sakramant an Aoter eo ar sakramant a zo ennañ Hor Salver Jezuz-Krist, gwir Doue ha gwir den, dindan spesou ar bara hag ar gwin.

3. Petra eo spesou ar bara hag ar gwin ?

Ar spesou eo furm, liou ha blaz ar bara hag ar gwin.

4. Ar bara hag ar gwin, ha chom a reont dindan ar spesou-se ?

Nann ; dindan ar spesou-se, ne chom na bara na gwin ; chenchet e vezont e korf hag e gwad Jezuz-Krist.

5. Penaos e vez graet ar chenchamant-se ?

Ar chenchamant-se a vez graet dre gomzou Hor Salver Jezuz-Krist a lavar ar beleg en ofierenn, d'ar gorreou.

6. Peur e savas Jezuz-Krist Sakramant an Aoter ?
D'ar Yaou-Gambrlid, d'an deiz a-raok e varo.

7. Perak en deus Jezuz-Krist savet Sakramant an Aoter ?

Evit chom ganeomp en tabernakl, servijout da vagadurez d'hon eneou, hag en em ginnig e sakrifis da Zoue e Dad.

Da lenn. — Eun devez, e Kafarnûm, Jezuz a lavaras d'ar Juzevien : « Me eo ar bara beo diskennet eus an Neñv .An neb a zebro eus ar bara-se, a vevo da-viken ; hag ar bara a roin, eo va c'horf evit silvidigez ar bed ».

Ar Juzevien, mantret, a lavare an eil d'egile :

« Penaos e c'helle an den-mañ rei e gorf da zebri » ?


Jezuz a lavaras d'ezo :

« E gwirionez, e gwirionez, m'hel lavar d'eoc'h, ma ne zebrit ket korf mab an den, ma ne evit ket e wad, n'ho peus ket ar vuhez ennoc'h. An neb a zebri va c'horf hag a ev va gwad, en deus ar vuhez peurbadus ha me e resusito d'an deiz diweza ».

(Hervez St Yann VI).

Dre ar c'homzou-se, Jezuz a bromete Sakramant an Aoter ; d'ar Yaou-Gambrlid eo e sevenas e bromesa.

Da ober : Me a raio ar pleg-daoulin dirak an tabernakl bep gwech ma 'z in d'an iliz.



Noe deuet er-maez eus an Arc'h, a ginnig eur sakrifis da Zoue.

(34^{vet}) PEDERVEI KENTEL HA TREGONT

1. Petra eo eur sakrifis ?

Eur sakrifis a zo eur prof kinniget da Zoue evit anzav ez eo mestr an Neñv hag an douar.

2. Petra eo sakrifis an Oferenn ?

Sakrifis an Oferenn eo sakrifis ar groaz lakaet war an aoter evidomp dindan spesou disparti ar bara hag ar gwin ha kinniget da Zoue dre zaouara ar beleg.

3. Perak en deus savet Jezuz-Krist sakrifis an Oferenn ?

Evit degas sonj d'eomp eus sakrifis ar groaz hag ober d'eomp kaout perz en e veritou.

4. Petra a vez war an aoter en Oferenn a-raok ar gorreou ?

A-raok ar gorreou, ne vez war an aoter nemet bara ha gwin.

5. Petra a vez war an aoter goude ar gorreou ?

Goude ar gorreou e vez war an aoter Jezuz-Krist e-unan, holl dindan spesou ar bara, holl dindan spesou ar gwin.

6. Evit petra e vez kinniget da Zoue sakrifis an Oferenn ?

Evit e adori, e drugarekaat, goulenn digantañ e c'hrasou hag ar pardon eus ar pee'hejou.


7. Evit piou e kinnig ar beleg sakrifis an Oferenn ?

Evit an holl gristenien, beo pe varo, dreist-holl evit ar re a vez dalc'het an oferenn evito.

Da lenn. — Sakrifis an Oferenn ha sakrifis ar Groaz ne reont nemet unan. An oferenn eo eta kaera ha talvoudusa tra a zo war an douar : divent eo he zalvoudegez. Ha gant gwirionez e c'hell levr Imitasion Jezuz-Krist lavarout :

« Ar beleg oc'h oferenna a rent enor da Zoue, a laouena an aelez, a binvidika an Iliz ; grasou a denn war ar re veo ; peoc'h ha diskuiz a c'hounez d'ar re varo ; hag e-unan en deus perz en holl vadou ».

Da ober : Me a heulio atao an oferenn en eul levr.



Jezuz en deus lavaret : « An neb a zebri va c'horfi hag a ev va gwad a chom ennoun ha me a chom ennañ ».

(35^{vet}) PEMPVET KENTEL HA TREGONT

1. Petra eo komunia ?

Komunia a zo reseo Ior Salver Jezuz-Krist e Sakramant an Aoter dindan spesou ar bara.

2. Ha rel eo komunia ?

Ya, ret eo komunia dindan boan a bec'hed, d'an nebeuta eur wech ar bloaz da Bask ha pa vezer e danjer a varo.

3. Ha mat eo komunia alies ?

Ya, mat eo komunia alies, bemdez zoken, hervez c'hoant an Iliz, gant ma vezo an ene e stad vat.

4. Peur e lle ar vugale komunia ?

Da Bask, kerkent ha m'o deus skiant a-walc'h.

5. E pe stad e lle beza an ene evit komunia ?

An ene a dle beza er stad a c'hras; ret eo ouspenn tostaat ouz an Daol-Santel gant eur galon eün, evit gwellaat ha plijout da Zoue.

6. Ha komunia a c'heller gant eur pec'hed marvel ?

Nann; komunia gant eur pec'hed marvel a zo eur sakrilaj.

7. Petra a zo d'ober, pa vez graet eur pec'hed marvel ?

Pa vez graet eur pec'hed marvel, eo ret mont da gofes a-raok.

8. E pe stad e lle beza ar c'horf ?

Ar c'horf a dle beza war yun, da lavarout eo hep beza na debret nag evet netra abaoe hanternoz; ret eo ivez beza gwisket kempenn hag en em zere'hel gant resped.

Da lenn. — Er bloavez 1910, an Tad Santel ar Pab Pi X en deus goulennet ma vefe komuniet ar vugale vihan kerkent ha ma teu o skiant d'ezo.

Er bloavez 1905, Pi X ivez en doa goulennet digant ar gristenien komunia alies, ha bemdez zoken, mar gellfent.

Daou dra hepken a vo ret evit komunia alies :

a) Ret eo beza er stad a c'hras.

Ne vez ket roet da zebri d'ar re varo; hag an ene er stad a bec'hed marvel eo maro ennañ gras Doue.

Ne c'hell ket an Aotrou Doue hag an diaoul mont asambles en eur galon.

b) Ret eo komunia gant eur spered eün, da lavarout eo : komunia evit gwellaat, evit en em santelaat, evit senti ouz an Iliz, evit plijout da Zoue.

Arabat komunia evit ober ar c'hiz, evit mont da heul ar re-all pe evit beza gwelet ha deuet mat d'an dud.

Da ober : Me a gomunio alies evit gellout chom er stad a c'hras.



Jezuz eo ar pastor mat. An danvad dianket eo ar pec'her a zistro ouz Doue dre sakramant ar Binijenn.

**(36^{vet}) C'HOUEC'HVET KENTEL
IIA TREGONT**

1. Petra eo ar Binijenn ?

Ar Binijenn a zo eur sakramant savet gant Hor Salver Jezuz-Krist evit pardoni ar pec'hejou a vez graet goude ar Vadeziant.

2. Peur en deus Jezuz-Krist savet sakramant ar Binijenn ?

D'ar Sul-Fask, p'en deus lavaret d'e ebistel : « Resevit ar Spered-Santel; ar pec'hejou a vezo pardonet d'ar re ho pezo pardonet d'ezo... ».

3. Ha ret eo reseo sakramant ar Binijenn evit beza salvet ?

Ya, kement hini en deus graet eur pec'hed marvel bennak abaoe e Vadeziant, a rank reseo sakramant ar Binijenn evit beza salvet.

4. Peur e resever sakramant ar Binijenn ?

Pa ro ar beleg an absolvenn.

5. Petra eo an absolvenn ?

An absolvenn eo ar setañ a zoug ar beleg en ano Jezuz-Krist evit rei ar pardon d'ar pec'her glac'haret.

6. Petra a rank ar pec'her ober evit reseo an absolvenn ?

Ret eo d'ezañ, da genta : kaout keuz d'e bec'hejou; d'an eil : o c'hofes gant lealded; d'an trede : beza prest da zigoll an droug en deus graet da Zoue ha d'an nesa.

7. Penaos e vez anvet an tri dra-se ?

An tri dra-se a vez anvet ar gontrision, ar gofesion hag an digolladur (satisfaksion).

Da leun. — D'ar Sul-Fask, diouz an noz, d'ar poent ma oa serret an doriou war an ti m'edo ennañ e ziskibien, aon d'ezo rak ar Juzevien, Jezuz, o veza deuet, en em ziskouezas en o c'hreiz en eur lavarout : « Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h ».

Neuze e tiskouezas d'ezo e zaouarn hag e dreid. An diskibien a dridas gant al levnezh o welout o Mestr.

Eun eil gwech e lavaras d'ezo : « Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h ! Evel m'en deus va Zad va degaset, evel-se ivez me ho kas ». Goude ar c'homzou-se e c'houezas warno : « Resevit ar Spered-Santel, emezañ; d'ar re a bardonoc'h d'ezo o fec'hejou, ar pec'hejou a vezo pardonet; d'ar re na bardonoc'h ket d'ezo o fec'hejou, ar pec'hejou ne vint ket pardonet ».

(St Yann XX, 19-23).

Dre ar c'homzou-se, an Ili'z hen desk d'eomp, e savas Jezuz sakramant ar Binijenn.

Da ober : Me a drugarekaio Hor Salver da veza bet ar vadejez da rei d'ar beleg ar galloud da bardoni ar pec'hejou.



Ar mab Ioran, di-troet d'ar gêr gant keuz d'e vuhe fall ha dezemeret laouen gant e dad, eo ar pec'her kaez glac'haret o tistrei ouz Doue.

(37^{vet}) SEIZVET KENTEL HA TREGONT

1. *Petra eo ar gontrision ?*

Ar gontrision a zo eur c'heuz gwirion da veza ofañset Doue gant eur volontez start d'en em virout diouz ar pec'hed en amzer-da-zont.

2. *Hag ar gontrision a zo eun dra ret ?*

Ya, hep ar gontrision ne c'heller morse reseo ar pardon eus ar pec'hejou.

3. *Pet seurt kontrision a zo ?*

Daou seurt kontrision a zo : ar gontrision barfet hag ar gontrision dibarfet.

4. *Petra eo ar gontrision barfet ?*

Ar gontrision barfet a zo eur glac'har da veza ofañset Doue, abalamour ma 'z eo peurvat ha din-meurbet da veza karet ha ma tisplij d'ezañ ar pec'hed.

5. *Petra eo ar gontrision dibarfet ?*

Ar gontrision dibarfet a zo eur glac'har da veza ofañset Doue, abalamour m'hon eus, dre hor pec'hejou, kollet ar Baradoz ha meritet an Ifern.

6. *Grit eun akt a gontrision.*

Va Doue, keuz bras am eus d'ho peza ofañset, abalamour ma 'z oc'h peurvat ha din-meurbet da veza karet ha ma tisplij d'oc'h ar pec'hed. Ho pedi a ran d'am fardoni dre veritou Jezuz-Krist; ha me a lavar d'oc'h a-greiz va c'halon n'hoc'h ofañsin mui gant sikour ho kras hag e rin pinijenn.

Da lenn. — E-pad m'edo Jezuz dirak e varnerien, Per, an abostol bras, a oa chomet da domma e porz Kafaz. Kemeret evit unan eus diskibien Jezuz, e nac'has e Vestr teir gwech dioustu, betek touf war ar gaou :

« Ne anavezan ket an den-se », emezañ.

Pa glevas ar c'hilhog o kana, e teuas sonj d'ezañ eus komz Hor Salver : « En noz-mañ zoken, a-raok m'en devezo ar c'hilhog kanet diou wech, te az pezo va nac'het a-benn teir gwech ». D'an ampoent ivez, Jezuz a dreuzas ar porz hag a daolas eur sell war e abostol.

Per, teneraet e galon ha keuz bras d'ezañ, a dec'has kuit ac'hano hag a skuilhas d'oc'h war e bec'hed. Pardonet e voe. Doue a bardon atao d'ar pec'her, p'en devez keuz d'e veza ofañset.

Da ober : A-raok mont da gofes, me a c'houlennno digant Doue lakaat em c'halon eur c'heuz gwirion d'am fec'hejou.



Er gador-gofes eo ret diskleria an holl bec'hejou a vez sonj anezo.
Kofes d'ar beleg a zo kofes da Jezuz-Krist e-unan.

(38vet) EIZVET KENTEL HA TREGONT

1. Petra eo kofes ?

Kofes a zo diskleria ar pec'hejou d'eur beleg evit kaout ar pardon anezo.

2. Ha ret eo kofes an holl bec'hejou ?

Ya, ret eo kofes da vihana an holl bec'hejou marvel, lavarout an niver anezo, hag ar pezh a rafie d'ezo beza grevusoc'h.

3. An neb a guz eur pec'hed marvel, ha pardonet e vez d'ezañ e bec'hejou ?

Nann, pec'hed ebet ne vez pardonet d'ezañ hag ober a ra eur sakrilaj.

4. Petra a dle ober an neb en deus kuzet eur pec'hed marvel en e gofesion.

Ober a dle a-nevez ar gofesion-se hag an holl gofesionou en deus graet abaoe.

5. Ar pec'hejou marvel ankounac'haet, ha pardonet e vezont ?

Ya, nemet eo ret o diskleria eur wech all, kenta ma vez sonj anezo.

6. Penaos e tleer kofes ar pec'hejou ?

Ret eo o displega iraez, war eün hag e berr gomzou.

7. Lavarit : Me a gofes ouz Doue...

Me a gofes ouz Doue... (p. 107).

8. Petra a zo da ober, pa vezer deuet er-maez eus ar gador-gofes ?

Trugarekaat an Aotrou Doue hag ober ar binijenn kenta ma e'heller.

Da lenn : ...ha da zeski.

PENAOS KOFES

A-raok	E-pad	Goude
1. Goulenn ar c'hras d'ober eur gofesion vat.	1. Lavarout « En ano an Tad.... Ho pennoz d'in va zad, abalamour m'am eus pec'het. Me a gofes ouz Doue... betek : dre va faot.... »	1. Trugarekaat Doue.
2. Klask mat ar pec'hejou.	2. Lavarout : Va Zad, abaoe..., n'oun ket bet o kofes. Bet em boa an absolvenn ha graet em boa va finijenn (pe : n'em boa ket)... Setu amañ ar pec'hejou am eus graet abaoe... enep Doue... enep va nesa... enep d'in va-unan... Eus ar pec'hejou-se, eus ar re a c'hellfen beza disonjet, pardon hag absolvenn, ma plij ganeoc'h. Dre va faot....	2. Ober ar binijenn.
3. Kaout keuz d'ezo.	3. Selaou gant evez aliou ar beleg hag ar binijenn a ro da ober.	3. Diwall mat diouz ar pec'hed.
	4. Lavarout an Akt a gontrision, hag, en eur vont kuit : « Bennoz Doue d'ec'h », va zad ».	

Da ober : Me a glasko mat va fec'hejou a-raok mont da gofes.



An Iliz a ro d'eomp an induljansou diwar goust poaniou hag oberou mat hor Salver, ar Werc'hez hag ar Sent.

(39^{vet}) NAVET KENTEL HA TREGONT

1. *Petra eo an digolladur (satisfaksion) ?*

An digolladur eo ar baecament eus ar boan a chom dleet c'hoaz evit ar pec'hed goude an absolvenn, hag an digoll a zo dleet d'an nesa, pa vez bet graet droug d'ezañ.

2. *Penaos e vez digollet justis Doue er bed-mañ ?*

Digollet e vez : da genta, dre ar binijenn a ro d'eomp hon tad kofesour ; d'an eil, dre ar bedenn, ar yun, al labour hag holl beaniou ar vuhez degemeret a galon vat.

3. *Ha digoll a dleomp ivez hon nesa ?*

Ya, p'hon devez graet gaou outañ en e gorf pe en e ene, en e vrud pe en e vadou.

4. *Hag eun doare bennak all hon eus c'hoaz d'en em zisamma eus ar poaniou dleet d'hor pec'hejou ?*

Ya, en em zisamma a c'hellomp c'hoaz dre an induljansou.

5. *Petra eo an induljansou ?*

An induljansou eo an diskarg a ro an Iliz eus ar boan a chom ganeomp da baea da justis Doue evit ar pec'hejou bet pardonet d'eomp dre an absolvenn.

6. *Pet seurt induljansou a zo ?*

Daou seurt induljansou a zo :
an induljansou leun hag an induljansou lodennek.

7. *Petra a ranker ober evit gounit eun induljans ?*

Ret eo beza er stad a c'hras hag ober kement a zo merket gant an Iliz.

Da lenn :

Jezuz a reas eun deiz e ziskenn e ti eur publikan anvet Zache, a oa tamallet gant ar Juzevien da veza bet savet pinvidik diwar o c'houst ha gant dizonestiz.

Zache a lavaras da Jezuz :

« An hanter eus va madou a roin bremañ d'ar paour ; ha m'am eus noaret da unan bennak, e restaolin d'ezañ pevar evit unan ».


O welout en doa Zache keuz d'e laeronsiou hag e felle d'ezañ digoll e nesa, Jezuz a lavaras :

« Hirio eo deuet ar silvidigez en ti-mañ... ».

(Hervez St Lukaz XIX).

Deskomp gant Zache digoll an droug a reomp.

Da ober : Me a raio va finijenn kerkent ha ma vezin deuet er-maez eus ar gador-gofes.



E-pad ma ro ar beleg sakramant an **Nouenn**, ar c'hlañvour a sonj en e bec'hejou, hag, a-greiz kalon, e c'houlenn pardon anezo digant Doue.

(40^{vet}) DAOU-UGENTVET KENTEL

1. *Petra eo an Nouenn ?*

An **Nouenn** a zo eur sakramant hag a zo bet savet gant Jezuz-Krist evit ober vad da ene ha da gorf ar re glañv.

2. *Peseurt vad a ra an Nouenn da ene ar re glañv ?*

An **Nouenn** a beurnêta ene ar re glañv, a ro nerz d'ezo enep an tentasionou hag o sikour da vervel e gras Doue.

3. *Peseurt vad a ra an Nouenn da gorf ar re glañv ?*

An **Nouenn** a dorr nerz ar boan hag a ro zoken ar yec'hed, pa gav da Zoue eo mat evit silvidigez an ene.

4. *Peur e lleer beza nouet ?*

Pa vezer gwall glañv, a-raok ma vezer aet re fall.

5. *Petra a ra ar beleg, pa ro an Nouenn ?*

Ar beleg a ra sin ar groaz gant an oleo-sakr war skiañchou an den klañv en eur bedi Doue da bardoni d'ezañ ar pec'hejou en deus graet dre ar skiañchou-se.

6. *Ar gristenien a zo war al lec'h, pa vez nouet unan bennak, petra a dleont ober ?*

Pedi a dleont evit an den klañv, hag ober o sonj da veva evel gwir gristenien, evit kaout o-unan eur maro mat ha santel.

Da lenn. — Eun devez, o tont eus gwelout e dud klañv, Sant Yann-Doue a voe diskouezet d'ezañ en eun doare burzudus e oa unan anezo o vont da vervel ha ne seblante ket beza gantañ ar maro. Ar Sant a lavaras e noui.... Ar c'hlañvour ha n'en em gave ket fall a-walc'h, a intentas gortoz.... Mervel a reas hep an **Nouenn**.

E-pad m'edo Sant Yann o sebelia e gorf, e teuas buhez ennañ en eun taol.

« Tad ar beorien, emezañ, pegwir n'eo ket bet falvezet ganin beza nouet, me a ranko bremañ chom hir bloaveziou e tan ar Purgator, skoet ma 'z oun gant justis Doue ».

Hag o veza komzet evel-se, e koezas adarre maro-mik.

Da ober : Me a c'houlennno alies em fedennou ar c'hras da reseo sakramant an **Nouenn a-raok mervel.**



An Aotrou 'n Eskob oc'h ober beleien nevez

(41^a) KENTA KENT L HA DAOU-UGENT

1. *Petra eo an Urz ?*

An Urz eo ar sakramant a ra ar veleien.

2. *Pehini eo karg ar veleien ?*

Karg ar veleien eo :

**Kinnig sakrifis santel an oferenn ;
rei ar sakramanchou,
ha prezeg lezenn Doue.**

3. *Piou a c'hell rei sakramant an Urz ?*

**N'eus nemet ar Pab hag an eskibien hag a
c'hell rei sakramant an Urz.**

4. *Petra a zo rei evit mont da veleg ?*

Evit mont da veleg, eo ret beza galvet gant Doue,
da lavarout eo :

**kaout deskadurez ha buhez vat ;
karout Doue hag an eneoù ;
beza dibabet gant an aotrou 'n Eskob.**

5. *Petra a dle ober ar bugel a gav d'ezañ eo galvet da veleg ?*

**Goulenn ali e gofesour,
poania da chom glan ha dibec'h,
labourat ha pedi.**

6. *Ha petra a dle ober e gerent ?*

**Lezel a dleont o bugel da gemerout hent ar
velegiez hag e sikour da vont da benn.**

Da lenn :

Sakramant an Urz, disheñvel war bez er ar poent-se diouz ar sakramanchou all, ne vez ket resevet en e memes devez. An den yaouank a vez galvet da veleg, a sav pazenn ha pazenn er c'hargou sakr.


Da genta e vez toüsuret.

Goude e reseo an urziou munut, pevar anezo, e diou wech.

Goude an urziou munut, an urziou bras : a vloaz da vloaz, hag a-wechou buanoc'h, e vez graet abostoler, avieler, ha beleg.

An eskibien hepken a sav war bazenn uhela sakramant an Urz. N'eus nemet hag o defe galloud da rei ar Gonfirmasion hag an Urz.

**Da ober : Me a saludo atao ar beleg, den a
Zoue.**



Eun eured

(42) EIL KENTEL HA DAOU-UGENT**1. Petra eo ar Briedelez ?**

Ar Briedelez a zo eur sakramant hag a santela dimezi ar gwaz hag ar vaouez.

2. Piou en deus savet ar briedelez hag ar familh ?

Doue eo en deus savet ar briedelez hag ar familh, p'en deus krouet hag unanet Adam hag Eva e Baradoz an Douar.

3. Piou en deus graet eus ar briedelez eur sakramant ?

Jezuz-Krist eo en deus graet eus ar briedelez eur sakramant evit ar gristenien.

4. Petra a zo ret evit ober gwir zimezi etre katoliged ?

Ret eo :

da genta, e vefent eurejet dirak person ar barrez pe eur beleg aotreet gantañ ha dirak daou dest;

d'an eil, e rofent o ger an eil d'egile a wir galon;

d'an trede, na vefe harz ebet o virout outo d'en em generout an eil egile da bried.

5. Ha galvet eo an holl gristenien da zimezi ?

Nann, darn a zo galvet gant Doue da vont en e servij.

6. Petra a dle ober ar re en em gav galvet da vont e servij Doue ?

Ar re en em gav galvet da vont e servij Doue, a dle pedi, goulenn ali hag en em rei da Zoue a-greiz kalon.

Da lenn. — Eun dimezi a voe e Kana er Galile. Mamm Jezuz a oa eno ivez. Jezuz e-unan a voe pedet gant e ziskibien. Ar gwin a zeus da vankout; mamm Jezuz a lavaras d'ezañ :

« N'o deus mui a win ! ».

Jezuz a respontas :

« Maouez, petra a fell d'eoc'h a rafen war an dra-se ? N'eo ket deuet c'hoaz an eur evidoun (da ziskouez va galloud) ».


E vamm a lavaras d'ar servijerien :

« Grit kement a c'hourc'hemenno ».

Ha Jezuz, war c'houlenn ar Werc'hez Vari, a reas e vuzud kenta, o chench an dour e gwin, en eul lein-eured.

(Hervez St Yann II).

Da ober : Me a c'houlenno digant Doue diskouez d'in e pe stad oun galvet gantañ da veva.



Holl dud an ti o pedi asambles, na kaerat taolenn !

(43^e) TREDE KENTEL HA DAOU-UGENT

1. *Penaos e tle ar c'hristen santelaat e zevez ?*

Oe'h ober pep tra evit plijout da Zoue.

2. *Petra a dle ar c'hristen ober, pa sav diouz ar minlin.*

Mont war e zaoulin da lavarout e bedennou.

3. *Penaos e tle ar c'hristen santelaat e labour ?*

O kinnig al labour-se da Zoue hag o c'houlzañv hep klemm ar boan en deus gantañ.

4. *Penaos e tle ar c'hristen santelaat e brejou ?*

Oe'h ober sin ar groaz hag eur bedennig a-raok ha goude pep pred, hag o tiwall da zebri pe da eva re.

5. *Ma c'hoarvezfe gantañ koueza er pec'hed, petra en defe da ober ?*

Gouenn pardon raktal digant Doue ha mont da gofes kenta ma c'hellie.

6. *Penaos e tle ar c'hristen echui e zevez ?*

Dre ar bedenn adarre, hag eur sell war e goustiañs.

7. *Ha mat eo lavarout ar bedenn asambles !*

Ya, dreist-holl ar bedenn diouz an noz. Ar « grasou » eo a zalc'h ar feiz en tiegeziou hag a denn warno bennoz Doue.

Da lenn :

E pep tiegez kristen e tle beza graet katekiz d'ar vugale bemdez, dreist-holl e-pad nozveziou hir ar goañv.

E pep tiegez kristen e tle beza bemdez, goude koan, lennet « Buhez ar sent ». « Buhez ar sent » eo skouer hon hini. Ar vugale a defe beza lakaet da lenn pep-hini d'e dro.


War-lerc'h « Buhez ar sent » e tle dont ar « grasou », a vezo lavaret gant an tad pe ar vamm.

Er grasou e vez pedet evit ar re veo hag ivez evit ar re varo.


Ar giziou santel-se o deus sikouret ar Vretoned da zerc'hel d'o feiz ha da veva e gwir gristenien.

Breiziz, dalc'homp mat da c'hiziuo santel hor Breiz !

Da ober : Pep devez a zo eur bajenn eus levr va buhez. Me ne skrivin warni nemet traou kaer ha santel.



Sant Erwan, patron Breiz, pedit evidomp... dreist-holl evit ar vugale vihan. Goulennit evito ar c'hras da chôm bepred kristenien vat ha Bretoned kalonek.



Santez Anna, patronez Breiz, pedit evidomp? hon diwallit diouz pep droug; en hor bro garet, mirit atao eur feiz start ha birvidik.



Ar Vretoned a zo devot d'ar Werc'hez Vari. Evit hec'h enori, ez eont niverus da bardona d'ar Folgoad, da Rumengol, d'ar C'hastellnevez, da Lanveur, da Wengamp, da Rostren, da Joselin. h. a.



PENAOES KOFES

A-raok mont er gador-gofes :

Grit sin ar Groaz hag ar bedennig-man :
« Salver Jezuz, deuet oun da c'houlenn pardon eus
va fec'hejou.

**Va sikourit d'o c'hask ha d'o c'havout holl,
d'o anzav holl,
da gaout keuz d'ezo holl.**

Gwerc'hez Vari, va sikourit da gofes mat ».

Goude : **klaskit ho pec'hejou.**

Ma n'ouzoc'h ket penaos o c'hask pe o lavarout,
lennit goustad roll ar pec'hejou a zo amañ war-lerc'h.
C'houi a welo pere hoc'h eus graet hag a lezo ar re-all.

It neuze er gador-gofes d'ho tro.

**Daoulinit enni, pe chomit en ho sav, ma 'z oc'h
re vihan.**

**Pa zigoro an nor vihan, troit war-du ar beleg, a zo
en tu all, grit sin ar Groaz ha lavarit :**

**« Ho pennoz d'in, va zad, abalamour m'am
eus pec'het ».**

Me a gofes ouz Doue holl-c'halloudek... hag ouzoc'h,
va zad, abalamour m'am eus pec'het bras dre sonj, dre
gomz ha dre ober.

N'oun ket bet o kofes abaoe...

Bet em boa an absolvenn.

Graet em eus va finijenn.

N'em eus disoñjet pec'hed ebet er wech diweza, (pe) :
er wech diweza em eus disoñjet lavarout...

Setu ar pec'hejou am eus graet abaoe :

1) PEC'HEJOU ENEP DOUE :

N'em eus ket lavaret va fedennou... (pet gwech).

O lavaret fall em eus... (pet gwech).

Manket em eus en oferenn da sul dre va faot (pet
gwech).

C'hoarzet, komzet, c'hoariet em eus en iliz...

Manket oun bet er c'hatekiz...

N'em eus ket desket va c'hatekiz...

Komzou groz am eus lavaret...

Mez am eus bet o tiskouez oun kristen...

Debri kig am eus graet d'an deveziou difennet.

PEC'HEJOU ENEP AN NESA :

Disenti am eus graet ouz va c'herent, va beleien,
va mistri.

Divergont oun bet outo.

C'hoarzet em eus d'ezo.

Skouer-fall am eus roet d'am c'hamaladed.

Aliou fall am eus roet d'ezo.

O lakaet em eus da ober droug.

Skei am eus graet ganto.

Laeret em eus madigou, frouez, arc'hant... (lavarout
pegement).

Disleal oun bet em c'hoariou.

Er skol em eus sellet war gaierou ar re-all.

Torret ha louzet em eus traou ar re-all.

Lavaret em eus gevier.

Diskuilhet em eus faotou ar re-all.

Lavaret em eus, eus ar re-all, **droug** ha ne oa ket gwir.

PEC'HEJOU EN ENEP AN-UNAN :

Lorc'hus oun bet (ourgouilhus).

Mouzet oun bet.

Piz oun bet.

Chomet oun bet da **sonjal e traou vil** (pet gwech).

Chomet oun bet da sellout ouz **traou vil** (pet gwech).

Komzet em eus eus **traou vil**.

Lennet em eus **levriou vil**.

Graet em eus **traou vil va-unan**.

Graet em eus **traou vil gant re-all**.

Avi am eus bet.

Lontek oun bet (gourmand).

Droug a zo bet ennoun.

En em venji am eus graet.

Diegus oun bet da sevel.

Diegus oun bet **er skol**.

Pa vez echu ganeoc'h diskleria ho pec'hejou, lavarit :

« **N'em eus sonj eus pec'hed ebet ken...**

Dre va faot, dre va faot »...

Neuze ar beleg a lavaro d'eoc'h eur gomz vat bennak da rei d'eoc'h sklerijenn ha kalon.

Selaouit ha taolit evez ouz **ar binijenn** a roio d'eoc'h.

Pa vezit gant hoc'h « **akt a gontrision** », sonjit petra a lavarit. Neuze e vez ar beleg, diouz e du, o rei d'eoc'h **an absolvenn** en ano an Aotrou Doue.


Pa vezit deuet er-maez eus ar gador-gofes, sellit ouz an tabernakl, ha, goustadik, gant ho kalon hag ho feiz, lavarit :

« **Va Jezuz, mil bennoz d'eoc'h.**

« **Ho trugarekaat a ran d'am beza pardonet.**

« **Hiviziken, me a vezo fur ha sentus ouzoc'h** ».

A-raok kuitaat an iliz, grit mat ho pinijenn. Pa vezo echu ganeoc'h, grit eur pleg-daoulin dirak **ar Sakramant**, hag it d'ar gêr, en eur sonjal er **gomunion** a dleit ober en deiz war-lerc'h.



Da veza lennet goustad-kenañ.

A-RAOK KOMUNIA

Akt a feiz. — Salver Jezuz, — me a gred start, — emaeoc'h aze er sakramant meulet ra vezo, — emaeoc'h o vont da ziskenn ennoun dre ar gomunion, — kredi a ran, — rak c'houi heñ lavar d'in : — « an dra-mañ eo va c'horf, — an dra-mañ eo va gwad ».

O Jezuz, beo en Osti, — kreskit va feiz.

Akt a esperañs. — Salver Jezuz, — dibarfet oun — n'oun ket din d'ho tegemer ; — fiziañs am eus avat — e santelaoc'h va ene, — e rooc'h nerz d'in — da stourm ouz an droug, — rak c'houi am c'har, — evel ma kar eun tad e vuget.

O Jezuz, — ken galloudus en Osti, — me am eus fiziañs ennoc'h.

Akt a garantez. — Salver Jezuz, — hoc'h eus va c'harer betek mervel evidoun, — hag a blij ganeoc'h — en em rei d'in er gomunion, — me ivez ho kar a greiz va c'halon — ha dreist pep tra. — Me a fell d'in beva — ha mervel en ho karantez.

O Jezuz, — ken mat en Osti, — me ho kar.

O Salver Jezuz, — mall bras am eus d'ho tegemer. Deuit, Salver Jezuz, — deuit.

GOUDE KOMUNIA

Adorit. — Salver Jezuz, — emac'h ennoun, — c'houi, ken bras, — ken galloudus, — me, ken bihan, — ken dister. — Dirazoc'h e stouan gant doujañs, — evel ma rae ar Werc'hez e kraouig Betleem, — evel ma ra an aelez hag ar sent er Baradoz.

O Jezuz diskennet em c'halon, — me hoc'h ador !

Trugarekait. — Salver Jezuz, — ken mat, — me ho trugareka evit hoc'h holl madelezou, — me ho trugareka dreist-holl — da veza en em roet d'in er gomunion santel.

O Jezuz beo em c'halon, — trugarez d'eoc'h !

En em ginnigit. — Salver Jezuz, — me en em ro d'eoc'h holl, — va c'horf, — va ene, — va menoziou, — va c'homzou, — va oberou.

En em roet hoc'h eus d'in, — me en em ro d'ec'h ivez, — evit atao.

O Jezuz — ken mat em c'halon — d'eoche oun bremañ.

Goulennit. — Salver Jezuz, — gouzout a rit pegen dinerz oun, — roit d'in ar c'hras, — da chom bepred en ho karantez, — da ober kalonek deveriou va stad, — da blega va zechou fall, — da chom dibec'h hiviziken.

Diwallit hoc'h Iliz santel.

Skuilhit ho pennoz war va c'herent, — va beleien, — va mistri, — va mignonned, — va enebourien.

Ho pedi a ran ivez evit, — Anaon ar Purgator.

O Jezuz, — ken galloudus em c'halon, — grit ma chomin atao, — en ho karantez.

Evel-se bezet graet.

PEDENNOU DIOUZ AR MINTIN

En ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel.
Evel-se bezet graet.

Evit adori Doue

1. M'hoc'h ador, Doue, va C'hrouer,
M'hoc'h ador, Jezuz, va Salver ;
Me 'zo amañ war va daoulin
'Vit ho pedi diouz ar mintin.

Evit trugarekaat Doue

2. Mil bennoz d'eoc'h, o va Aotrou,
Evit hoc'h holl madoberou :
D'am beza graet, prenet, miret,
Hag en hoc'h Iliz kemeret.

Evit en em rei da Zoue

3. Kement a rin, a lavarinn,
A c'houzañvin hag a sonjin,
A ginnigan evit ho kloar,
Keit ha ma vin war an douar.

Evit beza fidel da Zoue

4. Vit plijout d'eoc'h, Salver karet,
Me a dec'ho diouz ar pec'hed,
Hag a heulio a-benn-da-benn
Kement a zo en ho lezenn.

Evit goulenn grasou

5. Sellit ouzin, o va Jezuz,
Skuilhit warnoun grasou nerzus,
Ha dreist pep tra git ma vo don
Ho karantez 'barz va c'halon.

Evit pedi ar Werc'hez

6. Gwerc'hez Vari, va Mamm dener,
Bezit atao mat em c'heñver ;
Ha pa sono eur ar c'himiad,
Deut da gloza va daoulagad.

Evit pedi an Ael-Mat

7. C'houi, va Ael-Mat, kannad Doue,
Mirit va c'horf ha va ene ;
Na lezit ket an droukspered
D'am chadenna dre ar pec'hed.

D'hor Patron pe d'hor Patronez

8. Va Sant patron, me 'zo eürus
Da gaout hoc'h ano enorus.
Pegwir em eus ken bras enor,
Ho pet truez ouz ho filhor.

(Ar merc'hed a lavaro) :

Va fatronez, me zo eürus
Da gaout hoc'h ano enorus ;
Ha me ho ped, va maeronez,
Da henchha mat ho filhorez.

Evit pedi Jezuz-Krist hag ar Sent

9. Jezuz, Mari ha Jozef, itron santez Anna,
Sant Per ha sant Korantin, sant Paol, santez Barba,
Elez ha Sent an neñvou, me ho ped d'am difenn,
Ma c'hellin gant ho sikour gounit va c'hurunenn.

Pater noster

Pater noster, qui es in
cælis, — sanctificetur nomen
tuum ; — adveniat regnum
tuum ; — fiat voluntas tua,
sicut in cælo et in terra. —
Panem nostrum quotidianum
da nobis hodie ; — et
dimitte nobis debita nostra,
— sicut et nos dimittimus
debitoribus nostris ; — et
ne nos inducas in tentationem,
— sed libera nos a
malo. Amen.

Ave Maria

Ave, Maria, gratia plena,
— Dominus tecum, — benedicta
tu in mulieribus, — et
benedictus fructus ventris
tui, Jesus. —

Sancta Maria, mater Dei,
— ora pro nobis peccatoribus,
— nunc et in hora
mortis nostræ. — Amen.

Hon Tad

Hon Tad, hag a zo en
neñv, — hoc'h ano bezet
santelaet ; — ho rouantelez
deuet d'eomp ; — ho polon-
tez bezet graet war an douar
evel en neñv. — Roit d'eomp
hirio hor bara pemdeziek ;
— ha pardonit d'eomp hon
ofansou, — evel ma pardo-
nomp d'ar re o deus hon
ofanset ; — ha n'hon lezit
ket da goueza en dentasion,
— met hon diwallit diouz
an droug. — Evel-se bezet
graet.

Me ho salud Mari

Me ho salud, Mari, leun
a c'hras, — an Aotrou Doue
a zo ganeoc'h, — benniget
oc'h dreist an holl gwragez,
— ha benniget eo ar frouez
eus ho korf, Jezuz. —

Santez Mari, mamm da
Zoue, — pedit evidomp
pec'herien, — bremañ ha
da eur hor maro. — Evel-se
bezet graet.

Credo

1 — Credo in Deum Pa-
trem omnipotentem, —
creatorem cæli et terræ, —
2 et in Jesum Christum,
Filium ejus unicum, Domi-
num nostrum, — 3 qui con-
ceptus est de Spiritu Sancto,
— natus ex Maria virgine, —
4 passus sub Pontio Pilato,
— crucifixus, mortuus et
sepultus, — 5 descendit ad
infernus, — tertia die resur-
rexit a mortuis, — 6 ascen-
dit ad cælos, — sedet ad
dexteram Dei Patris omni-
potentis, — 7 inde venturus
est judicare vivos et mor-
tuos.

8 — Credo in Spiritum
Sanctum, — 9 sanctam
Ecclesiam catholicam, sanc-
torum communionem, —
10 remissionem peccato-
rum, — 11 carnis resurrec-
tionem, — 12 vitam æter-
nam. — Amen.

Confiteor

Confiteor Deo omnipo-
tenti, — beatæ Mariæ sem-
per virgini, — beato Mi-
chaeli Archangelo, — bea-
to Joanni Baptistæ, — sanc-
tis apostolis Petro et Paulo,
— et omnibus sanctis,
quia peccavi nimis cogita-
tione, verbo et opere :
mea culpa, mea culpa, mea
maxima culpa.

Me a gred e Doue

1 Me a gred e Doue
an Tad holl-c'halloudek,
krouer an neñv hag an
douar, — 2 hag e Jezuz
Krist, e Vab unik, hon
Aotrou, 3 a zo bet kon-
sevet dre c'halloud ar Spe-
red Santel, ganet gant
ar Werc'hez Vari, 4 en
deus gouzanvet dindan
Pons-Pilat, — a zo bet kru-
sifiet, maro ha sebeliet, —
5 a zo diskennet d'an ifer-
niou, d'an trede deiz
savet a varo da veo, — 6
a zo pignet d'an neñv, —
azezet en tu dehou da
Zoue an Tad holl-c'hallou-
dek, — 7 ac'hano e teuy
da varn ar re veo hag ar
re varo.

8 Me a gred er Spered
Santel, — 9 en Iliz santel
katolik, — e komunion
ar Sent, — 10 e remision
ar pec'hejou, — 11 e rezu-
reksion ar c'hig, — 12 er
vuhez peurbadus. — Evel-
se bezet graet.

Me a gofes ouz Doue

Me a gofes ouz Doue
holl-c'halloudek, ouz ar
Werc'hez glorius Vari, —
ouz an Aotrou sant Mikael
arc'hael, — ouz an Aotrou
sant Yann Vadezour,
ouz an ebestel sant Per ha
sant Paol, — hag ouz an
holl Sent, — abalamour
m'am eus pec'het bras
dre sonj, dre gomz ha dre
ober : — dre va faot, dre
va faot, dre va brasa faot.

— Ideo precor beatam Mariam semper virginem, — beatum Michaellem archangelum, — beatum Joannem Baptistam, — sanctos apostolos Petrum et Paulum, — et omnes Sanctos, — orare pro me ad Dominum Deum nostrum.

Goure'hemennou Doue

1. Eun Dou(e) hepken a adori
Ha dreist pep tra holl a gari.
2. Na dou ket ano Mestr ar bed,
Ma n'ec'h eus abeg mat ebet.
3. Ar suliou santel a viri
D'enori Doue, d'e bedi.
4. Da dad, da vamm a enori,
Evit pell amzer ma vevi.
5. Ha mir na lazi den ebet,
Nag a galon, nag a efed.
6. D'ar pec'hed vil n'en em ro ket,
Dindan boan da veza daonet.
7. Laerez na miret madou den
Gant gouiziegez ne ri biken.
8. Na gevier na fals-testeni
Mir birviken na lavari.
9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi,
Nag e sonj vil n'en em bliji.
10. Madou re-all na c'hoanta ket,
Evit o c'haout hep gwir ebet.

Setu aze
Goure'hemennou Doue,
Lezenn a garante
'Vit silvidigez hon ene.

Goure'hemennou an Iliz

1. Ouspenn ar sul a-hed ar bloaz,
Pevar gouel-berz a viri c'hoaz.
2. Klevout a ri mat penn-da-benn
Sul ha gouel-berz an oferenn.
3. Eur wech er bloaz da vihana,
E kofesai hep nac'h netra.
4. Ha da Salver a resevi
Da Bask devota ma c'helli.
5. Yun a ri an daouzek deiziou,
Ar C'horaiz hag ar vijilou.
6. Da zeiz vijil na da wener
Ne zebri kig e nep amzer.

— Rak-se e pedan ar Werc'hez glorijs Vari, — an Aotrou sant Mikael arc'hael, — an Aotrou sant Yann Vadezour, — an ebs-tel sant Per ha sant Paol, — hag an holl Sent, — da bedi Doue evidoun.

AN DE PROFUNDIS

V. De profundis clamavi ad te, Domine; Domine, exaudi vocem meam.

R. **Fiant aures tue intendentes in vocem deprecationis meae.**

V. Si iniquitates observaveris, Domine; Domine, quis sustinebit?

R. **Quia apud te propitiatio est, et propter legem tuam sustinui te, Domine.**

V. Sustinuit anima mea in verbo ejus, speravit anima mea in Domino.

R. **A custodia matutina usque ad noctem, speret Israel in Domino.**

V. Quia apud Dominum misericordia, et copiosa apud eum redemptio.

R. **Et ipse redimet Israel ex omnibus iniquitatibus ejus.**

V. Requiem æternam dona eis, Domine.

R. **Et lux perpetua luceat eis.**

V. Requiescant in pace.

R. **Amen.**

V. Domine, exaudi orationem meam.

R. **Et clamor meus ad te veniat.**

OREMUS

Fidelium, Deus, omnium Conditor et Redemptor, animabus famularum famularumque tuarum remissionem cunctorum tribue peccatorum, ut indulgentiam quam semper optaverunt piis supplicationibus consequantur. Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum.

R. **Amen.**

V. Requiem æternam dona eis, Domine.

R. **Et lux perpetua luceat eis.**

V. Requiescant in pace.

R. **Amen.**

V. Eus al lec'h doun em eus kriet war-du ennoc'h, Aotrou; Aotrou, klevit va mouez.

R. Troit ho tioukouarn evit selaou va fedenn.

V. Ma sellit piz ouz ar pec'hejou, Aotrou, piou a c'hello herzel ouzoc'h?

R. Met abalamour d'ho trugarez ha d'ho lezenn em eus gellet padout.

V. Va ene a zo bet harpet gant e gomz, va fisiañs am eus lakaet en Aotrou.

R. Adalek ar mintin betek an noz, ra lakaio Israel e fisiañs e Doue.

V. Rak Doue a zo eur mor a drugarez, karout a ra pardoni.

R. Pardoni a raio da Israel e holl bec'hejou.

V. Roit d'ezo, Aotrou, an diskuiz peurbadus.

R. Ra lugerno dirazo ar sklerijenn da-viken.

V. Ra vezint er peoc'h.

R. Evel-se bezet graet.

V. Aotrou, selaout va fedenn

R. Ra savo va mouez betek ennoc'h.

PEDOMP

Va Doue, Krouer ha Salver an holl dud, pardonit o holl bec'hejou da eneoù ho servijerien ha servijerez, evit m'o devezo, dre hor pedennou, eur sell a drugarez diganeoc'h, ar pez a c'hedont abaoe an holl amzer. C'houi a vev hag a ren e-pad an holl gantvejou.

R. Evel-se bezet graet.

V. Roit d'ezo, Aotrou, an diskuiz peurbadus.

R. Ra lugerno evito ar sklerijenn da-viken.

V. Ra vezint er peoc'h.

R. Evel-se bezet graet.

AN ANGELUS

V. Angelus Domini nuntia-
vit Mariae.

R. Et concepit de Spiritu
Sancto.

Ave Maria, — gratia plena,
— Dominus tecum; — bene-
dicta tu in mulieribus, — et
benedictus fructus ventris tui,
— Jesus.

Sancta Maria, — Mater
Dei, — ora pro nobis pecca-
toribus, — nunc et in hora
mortis nostræ. Amen.

V. Ecce ancilla Domini.

R. Fiat mihi secundum
verbum tuum.

Ave, Maria, etc.

V. Et Verbum caro factum
est.

R. Et habitavit in nobis.

Ave Maria, etc.

V. Ora pro nobis, sancta
Dei Genitrix.

R. Ut digni efficiamur
promissionibus Christi.

OREMUS

Gratiam tuam, quæsumus,
Domine, mentibus nostris in-
funde; ut qui, Angelo nun-
tiantem, Christi Filii tui Incar-
nationem cognovimus, per Pas-
sionem ejus et Crucem ad
Resurrectionis gloriam perdu-
camur. Per eundem Christum
Dominum nostrum.

R. Amen.

V. Gloria Patri, et Filio, et
Spiritui Sancto.

R. Sicut erat in princi-
pio, et nunc et semper,
et in sæcula sæculorum.
Amen.

V. An Ael a berz Doue a
saludas Mari evel Mamm Sal-
ver ar bed.

R. Hag e konsevas dre
c'halloud ar Spered-Santel.

Me ho salud, Mari, leun a
c'hras, — an Aotrou Doue a
zo ganeoc'h, — benniget oc'h
dreist an holl gwragez, — ha
benniget eo ar frouez eus ho
korf, Jezuz.

Santez Mari, Mamm da
Zoue, — pedit evidomp, pec'he-
rien, — bremañ ha da eur hor
maro. — Evel-se bezet graet.

V. Me a zo servijerez an
Aotrou.

R. Ra vo graet d'in hervez
ho komz.

Me ho salud, Mari...

V. Hag ar Verb en em reas
den.

R. Hag a vevas en hon
touez.

Me ho salud, Mari...

V. Pedit evidomp, o Mamm
Santel an Aotrou Doue.

R. M'hon devezo perz e
promesaou Jezuz-Krist.

PEDOMP

Skuilhit, ni ho ped, Aotrou,
ho kras en hon eneoù, ha p'hon
eus, dre salud an Ael, anave-
zet Emzenadur ho Mab Jezuz-
Krist, grit ma c'hellimp, dre
e Basion hag e groaz, en em
gaout e gloar ar resureksion.
Dre ar memes Jezuz-Krist hon
Aotrou.

R. Evel-se bezet graet.

V. Gloar d'an Tad, ha d'ar
Mab, ha d'ar Spered Santel.

R. Evel ma oa er penn
kenta, ha bremañ, hag atao
hag a-hed an holl gantvejou.
Evel-se bezet graet.

PEDENNOU DIOUZ AN NOZ

En ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel.
Evel-se bezet graet.

Evit trugarekaat Doue

1. Mil bennoz d'eoc'h, o va Aotrou,
Evit hoc'h holl madoberou :
D'am beza graet, prenet, miret,
Hag en hoc'h iliz kemeret.

Evit goulen sklerijenn da anaout hor pec'hejou

2. O va Jezuz, me a c'houlenn
Kaout diganeoc'h ar sklerijenn
Evit anaout e pet pec'hed
Oun bet, siouaz! hirio kouezet.
(*Taolomp eur sell war hor c'houstiañs*).

Evit goulen pardon

3. Keuz bras am eus, o va Salver,
Da veza bet eur seurt pec'her ;
Gant ho krasou hiviziken,
Me a vevo e gwir gristen.

Evit pedi ar Werc'hez

4. Gwerc'hez Vari, va Mamm dener,
Bezit atao mat em c'henver ;
Ha pa sono eur ar c'himiad,
Deut da gloza va daoulagad.

Evit pedi an Ael-Mat

5. C'houi, va Ael-Mat, kannad Doue,
Mirit va c'horf ha va ene ;
Na lezit ket an droukspered
D'am chadenna dre ar pec'hed.

D'hor Patron pe d'hor Patronez

6. Va Sant patron, me 'zo eürus
Da gaout hoc'h ano enorus.
Pegwir em eus ken bras enor,
Ho pet truez ouz ho filhor.

(*Ar merc'hed a lavaro*) :

Va fatronez, me 'zo eürus
Da gaout hoc'h ano enorus ;
Ha me ho ped, va maeronez,
Da henchha mat ho filhorez.

Evit pedi Jezuz-Krist hag ar Sent

7. Jezuz, Mari ha Jozef, itron santez Anna,
Sant Per ha sant Korantin, sant Paol, santez Barba,
Aelez ha Sent an neñvou, me ho ped d'am difenn,
Ma c'hellin gant ho sikour gounit va c'hurunenn.

Goude-se : Pater, Ave, Credo, Confiteor, Goude'hemennou Doue ha re an Iliz, De profundis, Angelus
(p. 106-110).

AN AKTOU

Akt a feiz. — Va Doue, me a gred start kement tra hoc'h eus diskleriet, — hag a ordren d'in an Iliz kredi, — abalamour ma 'z oc'h ar wirionez, — ha n'hellit na fazia nag hon lakaat da fazia.

Akt a esperañs. — Va Doue, me a esper digant ho madelez, — ha dre veritou Jezuz-Krist, va Salver, — ho krasou er bed-mañ hag ar Baradoz er bed all, — abalamour m'hoc'h eus lavaret o rofec'h d'in, — ha ma talc'hit atao d'ho ker.

Akt a garantez. — Va Doue, me ho kar a-greiz va c'halon, — ha dreist kement tra a zo, — abalamour ma 'z oc'h peurvat, — ha din-meurbet da veza karet, — ha me a gar ivez va nesa, eveldoun va-unan, abalamour d'eoc'h.

Akt a gontrision. — Va Doue, keuz bras am eus d'ho peza ofañset, — abalamour ma 'z oc'h peurvat, — ha din-meurbet da veza karet, — ha ma tisplij d'eoc'h ar pec'hed. — Ho pedi a ran d'am fardoni dre veritou Jezuz-Krist, — ha me a lavar d'eoc'h a-greiz va c'halon — n'hoc'h ofañsin mui gant sikour ho kras hag e rin pinijenn.

AR BENEDICITE

A-raok ar pred :

Jezuz, ho pennoz d'eomp
Ha d'ar pred a gavomp
War an daol prest evidomp;
Roit bara bepred
D'ar re n'o dije ket,
Evel-se bezet graet.

Goude ar pred

Trugarez d'eoc'h brema,
Doue mestr war bep tra,
Magadurez ha yec'hed.
Ho pugale laouen
Ho karo da-viken.
Evel-se bezet graet.



Église catholique
en Finistère

Document numérisé en 2019